

# ARVORIG



MIZ GENVER 1913

Digemer mad, Arvorig . . .	AR YEODET.
'Vit ar Vugale.	ARVORIG.
Dêrou mad ar Mabig Jezuz.	KOULM. AR.
An ti . . .	TADIG.
Luskellerez.	GWELTAS.
Hon Ilizou . . .	Y. M. G.
Stêr al Leger . . .	EUR MIGNON
Ar « Mabig Jezuz »-all . . .	D...
C'hoariou Kerne . . .	EUR C'HERN.
An Ermit dizoursi ; Sant Tremeur ; Bue ar Vreuriez, etc...	

Moullerez AR 'GWAZIOU, Montroulez

## Ar bla-man,

**ARVORIG** a vouлло, etouez kalz a dreo-all,

**KONTADENNOU** *evel :*

Ar c'havrig torret he c'horden,  
An diaoul hag ar c'hemener,  
Torfed Toull-al-laeron,  
An daou gok aour,  
Aluzen tintin Marijan.

**GWERZIOU** *vel :*

Kimiad,  
Sonig Sant-Nikolaz,  
Bue burzudus S. Houarnaou.

**KENTELIOU WAR ISTOR BREIZ**, *seurt gant*

Ster ar Blavez,  
Istor kêriou Treger ha Kerne,  
Ilizou ha chapelioù Breiz,  
Istor Taupin,  
Maro person Trabriant (1793).

**KENTELIOU WAR AR RELIJION :**

An oferen dre dôlennou.

**KENTELIOU WAR AR BREZONEG.** *'vel :*

Ar galleg desket dre ar brezoneg.

**SONIOU HA TONIOU** *vel :*

Ma biniou etc.

**PEZIOU-C'HOARI** *vel :*

Ar Mesias, mister en pemp arvest.

**STUDIOU** *plijadurus ha skouerius 'vel :*

Distro pardon S. Gweltas,  
Beaj da vro ar Stered,  
O kutuilh bleuniou,  
O vouara etc.

En eur ger, diduamant, plijadur, karante-vro, kentel ha skouer vad a vo kavet frank 'barz *Arvorig*.

Kaset ho koumanant d'ei, tudou, ha koumanantet ho pùgale.

8 real ar bla (2 fr.) vit an dud vras ;

5 real ar bla (1 fr. 25) vit ar vugale, o devo prijou da c'hounit war ar marc'had.

Adres an tensoner a zigemer ar c'houmananchou :

**M. Francis EVEN,**  
près la Cathédrale, Tréguier.

## AN AOTROU ROLLAND

person Trabriant

(1793)

An aotrou Rolland, oa person e Trabriant amzer ar Revolution. Pa deuas bec'h war ar velefen, ez eas da guzat da di unan eus e vignoned.

D'ar mare ze, eun den a c'houlennas da bried eur plac'h yaouank eus ar gwella hag eus ar muia kristen.

— Eo zur, eme houma, me ne c'houlennan ket gwell. Mes hon eured a rank beza binniget gant eur beleg mad.

Ar plac'h yaouank a anaveze an aotrou Rolland. Gouzout a rê pelec'h oa kuzet. Kemen a reas d'ezan hen dije d'he eureuji.

An den yaouank, epad an amzer ze, oa bet betek archerien Keraez, evit dibuna e istor : « Lezit ar beleg, a lavaras d'eze, da eureuji ac'hanomp. Mes goude, avat, dastumit anezan, mar kirit.

Grêt oe hervez e c'hoant.

Prest goude, an aotrou Rolland oe kroget ennan e ti e vignon. Pierre Cazeillat.

Epad ma oa en e brizon, e teuas d'e welet eun den hag a anaveze. E dud o doa brud vad, hag an aotrou Rolland hen digemeras laouen.

An den ze a reas an neuz da druezi war e stad. Ouz e glevet, en em jale kalz war e bouez.

Ne oa deut d'ar prizon, e lavare, nemet evit ober d'ezan ar vad a c'hellje : Ho kerent, emezan, oa diès awalc'h d'eze dont betek ennoc'h. Mes, mar ho peus eur gefridi bennak evite, me, a galon vad, a reio anezi.

An aotrou Rolland, tromplet gant komzou brao, er giz-ze, a zigoras e galon. — Eo zur, emezan, e ti ma breur, en eur voger, 'm eus kuzet eur pezh a gant skoed hag eur c'halur aour. Hen ne oar ket. It d'heñ lavaret d'ezan, mar plij. Ha lavaret d'ezan ive e varvin laouen, ma kar chom atao eur c'hristen mad.



En eur gwitaat an aotrou Rolland, an den-ze a yeas d<sup>a</sup> gaout an archerien. Konta reas d'eze ar pezh en doa klevet. Ar re-man ya raktal da glask ar c'halur aour hag an arc'hant. Hep furchal kalz, e kavont ar guzaden. Breur an aotrou Rolland a oa war al lec'h hag a lavaras eun dra bennak. Dustu oe kroget ennan ha kaset d'ar prizon.

An devez warlerc'h, ar beleg gwall-eürus oe dibeunet e Brest, d'ar 25 a viz mae 1793.

(Kaset gant an aotrou Jezegou).

## EUR VALEADEN AR MIZ

### Da vro Ar Gonideg



ell e kever eman Lokrist, hag en n'eman nemet eun hanter-leo, rak heol here a dom da vat hag, a hed an hent kil-droennus, ne gever ket eur bod da c'hallout disheolien. An ôtro Keravel, aman er gêr, ne losk da zével nemet spern ha drez, ha c'hoaz dre dailh. Hen eo roue ar vro-man, eur roue gary ha didrue, a blij d'ean diskoue e c'hallout.

Herle eo savet war e du mat : fellout e ra d'ean, marvat, kemer lod er pardon. Kredi awalc'h e rafen ive e touj ar re varo ; ne c'hailh ket, da vihanan, ar gouriz gwe a zo endro d'o beiou.

Diazeet war grap eur roz, troet warzu ar mor bras, a weler o steredenni du-hont er c'huz-heol, koantat bered gwaskedet ha disheoliet eo hini Lokrist ! Dudijs eo ar beure-man ha henvel ouz eun dachen bardon gant tud a vilvern war an holl veiou ha betek en begou ar gwe. Tud a bep renk hag a beb oad : bugale ar skolioù ; pôtréd yaouank troet o sperejou warzu al labour vrezonek ; plac'hed yaouank, gwisket evel prinsezéd, gant o chaliou brodet hag o c'hoef-fou gwenn dantelezet ; lezennourien, beleien, barzed ha skrivanerien ; tud kabac'h gant ar gozni, hag o devoa gwelet marteze, en o bugaleach, an digemer kaër great da relegou o c'henvroad, pa oant bet digaset eus a Bariz da Benn-ar-Bed, breman ez eus eiz vloaz ha tri ugent.

Ouz ar min-be, d'ean stum eun tour dantelezet, e stager eur pikol kurunen hag an ôtro Roull, person Sant-Loeiz Brest, a grog d'ober meuleudi ar brezoneg. Diousta goude, kloc'h chapel Lokrist a dint ar c'hlaz hag al « Libera » a zo

kanet gant ar veleien hag ar bobl ; an ezen, o vouskanan e-touez an deliou hag ar bannielou erminiget dam-guzet enne, a zeblant unani e beden gant hini ar gristenien.

\* \* \*

Tro breman d'ar prezegennoù ha d'ar gwerzioù ! An eil warlerc'h egile, an ôtrone A. Ar Braz, — eun teozer ne skuizer ket o silaou, — Andrieux, Jaffrennou, Botrel ha Tillenon, heman en hano Ar Yeodet, a bign war jijen ar groaz da veuli Ar Gonideg hag al labour grêt gantan. *Bro goz ma Zadou* a gloz an abaden.

Da 1 eur, 200 Breizad en em gav da vernian en « Hôtel Breiz », dirak ar mor bras, en Konk. Deut eus an Arvor hag an Argoad, eus Gall zoken, an dud-ze o deus kredennou ha mennoziou dishanval ; hogen, karante Breiz a verv en o c'hreiz hag a ra d'e lóskel da vale pep drougiez ha kasoni. Ar sonj int breudeur, bugale d'an hevelep mam, a laka sioulder en o spered, sklerder ha levenez en o daoulagad. Ar c'hózeadennou a deu gant pephini war fin ar pred a diskoue anat e kord ar c'halonou. Kannaded, an darn-vuian, eus breurie-zou hag unvaniezou Breiz, bet tabut entreze gwejall, ma oa eun drue, n'eus hano gante nemet eus madelez, kaerder, brasder ar Vro. Eus lein an envo, Ar Gonideg a dle tridal o welet eun neventi ken frealzus. Ma karfe ar Vretoned en em c'houzanv hag en em garout evelse, hebdale Breiz a ve barrek.

\* \* \*

Daoust d'ar ganadeg, mont e ran d'abarde betek an tourtan a zo en penn beg douar Kervorvan. Pegen kaer eo ar mor eno ! Sioul eo ha glaz-glizin, eun drugar sellet d'e gât. Eman evel morgousket ; a-vec'h ma klever eur voubon endro d'ar c'herrek ha kan an ourligou-mor — an heol o c'hoari enne — a deu da lipat ar bili hag an tréz.

Pebez kem pa ve konnaret ! Eus an Amerik betek aman, netra na stourm ouz ar gwagennoù. Nag Eusa, a gav d'in gwelet du-hont en dremwel, na Moalenez, er-velen dindan lagad an heol, na kennebent Kemenez ha Biniget, hanval

ouz listri sonnet war an dour, na dor nerz ar c'hoummou. An tarziou-mor frommus, uhel evel touriou, a flastr al listri hag o darc'ha war ar rec'hel. Nag a bed a zo bet dispennet evelse entre Eusa ha Lok-Maze ! N'eo ket braw darempredi ar Fromveur t

An dud a ro ive darbar d'ar mor eun dro bennak. Sôzon ha Bretoned a zo en em daget aman meur a wej.

En amzer an dukez Anna, ar bla 1513, Porsmogor, lakeet d'ean an tan en e lestr « La Cordelière » gant ar Sôzon, a redas a-her hag a begas war ar « Régent », lestr an amiral sôz : lesket e oant o-daou war an dro, a-hont, etal an Trêz-Gwen.

En 1558, Konk a oe drastet ha devet gant ar Sôzon : ne chomas eus kêr nemet eiz ti, a zo c'hoaz en o zaw herie....

Arôk dizrei, e tolan eur zell war Lok-Maze-Penn ar-Bed, a zo aze er c'hreiste. Ne van nemet dismantron, kaer c'hoaz da welet, eus an abati savet er VI<sup>et</sup> kantved gant sant Tangy.

War ma giz breman. Al lano a zo krog da c'houlou tréz ar pleg mor. War brenechou kêr hag en dour, an heol a skuilh sklerijen ru-poaz. Tier Konk, a welan dirakon a vad, a zeblant redet an eil warlerc'h egile eus an ôd betek an iliz, du-ze war an uhellen, an iliz eman enni be an tad Mikêl an Nobletz, ar misioner a gristenas paganed Goueled-Leon, bean zo 300 vla.

An tad Mikêl, Ar Gonideg, daou Vreizad a ra brud hag enor da Gonk-Leon. Ma kar Konkiz heuilh ar gelennadurez roet gante, e voint bepred eur skouer evit ar Vretoned. Ne oufient ket kât gwelloc'h paeroned. ....

KAREVRO.

An hini n'hall ket tremen heb eur pred  
Ha dibri daou 'n unan n'eo den ebet.

Ar paizant skuiz hag an dijentil meo  
N'int ket mestr d'o zreo.

Equ tam bihan goude hola  
Na droug na vad ne ra.

### Tud ha treo ar Vro<sup>(1)</sup>



ant an daerou strinket enne dindan nerz he c'harante a bried hag a vamm o c'harm, o krial en he c'hreiz betek rannan he c'halon, daoulagad an itron Taupin ne welont ket pegen kaer eo ar bed dindan sklerijen an heol o tisken drek he c'hein d'an traou gant an oabl sioul ha digoummoul.... An evnigou straffullhet gant an dourni, ar jabadao a ra an dispac'herien en eur zont gant an hent, a baouez da richan, a nij, en eur dikal truezus, eus an eil bod d'egile, da difenn o neziad evned bihan kuzet drek an deliou glas. Ar gristenien daou-bleget o c'houennat an drouk-louzou en kreiz o farkadou gwiniz dru, a sklas o banne gwad en o gwaziou o klevet kanaouennou hudur ar vanden lankoned-ze o tremen, ha ne gredont ket, zoken, sevel o fenn da zellet.

#### Hostaliri ar Pont-Losket

#### Hostaliri an hanter-hent

Sec'h ha kras o goug o tiskargan galleg brein, galleg put ar *Ça ira* war douar santel Breiz Izel, a dregernas ken alies gwech gant gwerziou sakr hon sent hag hon barzed koz, skotet o sklank, distôladennou Etampes — eiz kant pemp warn-ugent soudard eus Etampes a oa tôlet war hon bro d'he glac'hari, — a diskennas d'ober peb a gorfad en hostaliri Pont-Losket Sant-Erwan, dalc'het gant Gwilherm al Lajat ha Mari-Iann ar Gwazou, tad ha mam ar beleg gilhotinet ar beure-man war leur-gêr marc'hallaç'h Lannuon. Goude

(1) Gwelet Arvorig miz here.

beau grêt d'al Lajat koz disken eur pikol chopinad hini krenv d'ar boureo Lacaille, an tigréd kalonou dir-man a stlejas an tad gante, da greiz an hent, da welet ar gilhotin ru-tom c'hoaz gant gwad e vab beleg. Ne bad nag e zaoulagad nag e galon da zellet ; diskaret eo gant eur falladen d'an douar. Eur mab den yaouank a oa er gêr gantan a oe skoet ken stronsus en e benn, o welet eun dra ken skrijus, ken ma troas e spered war an tól. Hag ar vam !... Ne gomzer ket eus ar vamm ; hep mar, e varvas frailhet he c'halon gant an anken !

Ha lavaret 'zo, hirie an de, tud gaouiad, tud fôz awalc'h da lakat, etre daouarn bugale ar skoliou, levriou hag a ra meulodi amzer diaoulek an Dispac'h ! C'houi, da vihanan, bugale savet er skoliou kristen, hopet a-bouez ho penn :

*Kuz da benn, heol binniget, 'n eur welet torfejou*

*Ha ne dlejent bean grêt 'met gant drouk-sperejou !*

Pegeit e padas an abaden ? Pegeit e chomas amprevaned Etampes da c'hañan tad ha mam an O. Lajat ha da drepani ar vamm-all a dalc'hent ereet eno gant kerdenn war gein o c'hoz varc'h, klanv he spered gant an hast da welet he bugale 'man hep kelou dioute abaoe dimerc'her, an de oent diframmet diouz tre he diouvrec'h ? Pegeit e chomas an diaoulou dichadennet-man da c'hoari-vaz endro da hostaliri Pont-Losket ? N'ouzon ket. Bepred e oa serr-noz pa digouejont gant an tier a zo en tu-man da Landreger, tier kalvar iliz Sant-Mikél.

*(Da heuilh).*

EUR MIGNON.

---

Pa zavo Gwiklan eus e ve,  
Eus ar brezel vo an digoue.

Souben an tri draig,  
Dour, holen ha baraig.

N'eus ket a voien da voienni  
D'ober souben hep drueni.

Red eo gortoz e varc'h da vont warnan,  
Pa n'heller ket bale heb-an,

## AN DAOU ÊL

An noz a oa tenva hag an avel a c'houee a-dreuz da goadaj loj Yan Vado, eul labourer koad eus Koad-an-noz. Erméz, an douar a oa goloet gant mantel wenn ar goanv. An ncz a oa sioul ; ne glevet seurt, mui evit pa vije maro kement a oa war ar bed. Al lern koulz hag ar c'haouenned a dave 'pad noz santel an Nedeleg.



Yan Vado oa o tanzen mont gant e vugale da oferen hanter-noz, pa deuas en ti daou veajour. Da gentan e teuas eun den bras ha kasti, daoulagad chouchet en e benn, d'ean eur pennad bleo difurlu ha luet. Kerkent hag hen, e teuas eun den yaouank leun a er vad, gant eur pennad bleo melen goloet a erc'h ha daoulagad ken sklér ha ken dous ha re eun êl.

Ar c'hentan beajour 'n evoa skrignet e zent pa 'n evoa

gwelet egile oc'h arruout. Heman a goachas e-tal an tan, hag ar vugale a yeas en e gichen, heb aon ebet outan, da c'hoari gant e vleo hir ha da grapat war e zaoulin. An eil, beajour a oa 'n em laket da gontan pep seurt treo fentus 'vit sorc'henni ane ive, mes kaer an evoa, hini 'bet ne dostae outan.

— Gouzout a ret, bugale, eme ar beajour bleo melen, fenoz, en Betleem, eo ganet ar Mesias, ar Mabig Jezuz, an hini an eus torret ar chadennoù a oa laket war an dud gant an drouk-spered. . . .

Ar beajour-all, o klevet se, a rigonse e zent gant a gounnar a oa ennan.

— Da betra, emean, e chomet aze keit all war bale? — Da vont d'oferen hanter-noz, da adori Jezuz, hon Zalver neve c'hanet. — Hag an amzer ken fall? chomet er gêr; me ho tiduo gwelloc'h 'vit ar Jezuz-ze en e graou distô, gant e azen hag e ejen! . . . Me 'm eus kalz a droiou kaer da ziskouel d'ac'h! — Na gredet ket anean, eme an eil beajour; hennez eo tad ar gevier. E blijadurioù n'int nemet moged hag e ardou n'int nemet pec'hed. Mar chilaouet anean, e nac'hfet an Hini zo ganet er c'hraou evidoc'h.

— Nan, nan, ma den mad, eme Yan Vado, c'houi eo a chilaoufomp, ha d'an oferen ec'h efomp fenoz.

N'evoa ket achuet e gomz ma krenas an ti gant eur pezh tarz-kurun; ar beajour kentan a lampas en oaled, 'barz an tãn, o sonjal kãt digor eno dor an ifern; ne zanje ket e oa binniget an tãn-ze. Ne oa ket et mad ebarz ma loskas eur skrifaden euzus ha, pa ne oa ket evit tec'hel dre an tan, e krapas er chiminal; ramoni anean a reas, zoken, en eur dremen, koulz ha gwelloc'h 'vit pep ramoner.

Pa dizroas Yan e benn 'vit gwelet pelec'h e oa an eil beajour, e koueas d'an daoulin gant e wreg hag e vugale: eun el a oa dirakan, eur gurunen lugernus endro d'e benn, e iskilli digor evit nijal d'ar baradoz.

— N'ho pet ket aon, emean, argaset ho peus an drouk-spered. Peuc'h hag evurusted a vezo ganac'h, pan hoc'h bet tud a volante vad.

PEN BEUZ,

*Breisad yaouank divroet.*

## KONTADEN NOLLIG

PENNAD DIVEZAN



ur c'housteladen a dregernas souden ha, kerkent, Nollig a welas o tont eur marc'h liou an heol ken skany en e gerzed ma ne stoke ket e dreid ouz an douar.

Tremen a reas en tu-all d'ar mene hag ar pôtr ne ouias ket pelec'h e oa et. Sonjal a reas goulenn kuzul digant e vignoned. Ar re man en em gavas raktal: « Du-ze, eme, 'n eur vro dreist da houman, zo eur poull, ar Poull-Heol, hag ar benviou pe an armou

bet trempet ennan n' o deus ket o-far. Met bep seiz vla e renker adtrempañ ane. N'eus nemet ar marc'h-man hag a c'hall bale betek ar poull-ze. Varc'hoaz, perc'hen ar c'hastel a gaso tud war e gein da gerc'hât dour-heol da drempan e glazeier. Neuze e vefe mestr d'ar c'hastel c'hoaz epad seiz vla. Laerez ar marc'h a vo red ober, mac'h i te gantan d'ar poull-ze. — Me, eme unan eus an tri gornandon, eo mestr an Ane; me a rei d'it armou. Ha me, eme an eil, eo mestr ar C'hleze; me a zesko d'it c'hoari anean. Me, eme an trede, eo mestr an Delen; me a rei kentel d'it war ar c'han.

Dindan ar mene e kavjont eur c'hao etouez ar rec'hel; eno pôtr an ane en em lakas da c'hofelian. Pa oe prest an armou, e reas ive war e ane eur roued dir ken fin ha gwiad kefnid ha ken kal-t ha diamant. An de warlerc'h, war hent ar c'hastel, mestr an ane a stignas e wiad dir; ar marc'h o tremen 'vel eul luc'heden en em skoas enni hag en em luisas evel eur gelien en gwiad eur gefniden. Ar pôtr a oa war e gein, kaer en doa, n'halle ket 'n em diluian; mestr ar c'hleze a droc'has d'ean e benn ha Nollig a bignas war ar marc'h.

Heman a dec'has kerkent 'vel eur zanj. Hepdale, ne ouie ken ar pôtr ma kerze war an douar pe war goummoul an oablou. Bean oa ouz an dibr eur c'halei acour ouz eur chaden, marvat da lakat an dour-heol. Pa welas Nollig ar poull dirakan, e renkas mouchan e zaoulagad; neuze e plegas en eur dremen hag e kargas ar c'halei eri ar chaden.

..... Marc'h eg ar c'hastel a bigne bemde war uhelan tour a oa da welet ha dont a vo endro ar marc'h hag e vevel.

Goude tri de, e gleze nevoa ken e vertu. Ar beveded de e welas o tont eur pôtr yaouank goloet a armou lufr evel an heol. Neuze ec'h ouveas e oa bet grêt boutison d'ean; mes ar goun-



nar a reas d'e an disken da c'houren ouz ar marc'heg yaouank, eur bugel da welet. Ouz ar c'hleze heol ne oa ket da stourm ; ledet e oe ar marc'heg war an dachen ha lemmet e vue digantan.

Nollig, lore'h ha levezet en e greiz, a gerzas neuze evit mont en kastel e dadou. Petra'ta ? Dor ebet ne zigor ? — Penôs, emean, petra zo c'hoaz o stourm ouzin ? — Kemeret an delenman, eme mestr an delen, ha sonet ganti 'vel am eus bet desket d'ac'h Ah ! galloud dudius ar e'hân ! Kerkent an dorjou a wigouras hag a zigoras ane o-unan.

Bean oa eno, prizoniet dindan an douar, breudeur ha c'hoarezed d'ar pôtr yaouank, mitizien ive, chadennou endro d'e bet trempet en dour-heol. Gant e gleze, Nollig o zroc'has.

Eur pred bras a oe grêt, pred an Delen, goude pred ar C'hleze. Eno oe eun ehad seurt n'eus bet gwelet biskoaz. Diwardro, ar hobl a bignas ep' d eur miz d'ar c'hastel, o tibri hag o tiviz laouen e kreiz sôn an telennou. Ar vue a zavas a-neve betek kalon an dud hag ar garante a badas etreze keit ha bue ar roue Nollig.

---

Ar miz a deù :

## PRIJOU AR VUGALE

---

*Tadou ha*

*mammou,*

*mestrou ha*

*mestrezed-skol,*

**Koumanantet**

**ho pugale d'Arvorig.**

## Bevet, bevet Arvorig !

*D'an Otrou E. ar Moal*

Eur goulmig wenn am eus gwelet  
Us da Vreiz o tarnijal,  
Gant dorn Doue eo diwallet  
Ouz flemm enebourien fall ;  
He diouaskel 'zo flour ha glan,  
He mouez ken c'houek, ken dousig,  
Ma lavar holl, bras ha bihan :  
« Bevet, bevet Arvorig ! »

'Barz en pep lec'h a Vreiz Izel,  
Evel bleuennou dispar,  
Perlez diouz plu he diouaskel  
A goue puilh war an douar ;  
Kelaouennig vad, kan bepred  
'N hon yez, war da zeleunnig ;  
Te a ra enor d'ar Varzed...  
Bevet, bevet Arvorig !

Kas da hep korn eus hon bro ger  
Da werziou ken dudius ;  
Frealz kalon al labourer,  
Rent ar bugel evurus.  
Ekleo hon méziou 've laouen  
O tiskuilha da vouezig,  
Te eo ar goantan kelaouen...  
Bevet, bevet Arvorig !

Blavez mad d'it, Arvorig-kez !  
Blavez mad d'az lennerien !  
'Vit rei skoazel d'hon fe, d'hon yez,  
Buhe hurr d'az Renerien !  
'Vit da veuli, al *Laouenan*  
'Zo dister e bluennig ;  
Mes war ar *Roz*, 'n e yez e kan :  
« Bevet, bevet Arvorig ! »

LAOUENANTIG AR ROZ.



WAR DON : *Kan mintin d'ar Werc'hez (K. G.)*

D'ar c'houlz 've an ed o veleni,  
 Breman zo daou vla e c'hanas ;  
 Tost e oad neuze da viz Mari,  
 Ha da Vari ni he gwestlas ;  
 Digas e ré joa, levezet.  
 'N eur dont er vuc ;  
 En hon zi hi oa rouanez.  
 Elig Doue.

Maryvonig a oa he hano,  
 Hano ken dous 'vit ar Breizad,  
 Filhorez rouanez an Envo  
 Ha sant Ervoan, hon advokad ;  
 He gwelet a oa eun dudi,  
 Kea leun a vue,  
 Ken glan, ken gwenn hag al lili,  
 Elig Doue !

An heol hany a golle e domder ;  
 Kimiadi ré ar gwenilt ;  
 Ni a wele, laouen ha seder,  
 Hon Maryvonig o kreski :  
 « Pa vi bras, te a vo, merc'hig,  
 Souten hon bue ;  
 Da c'hortoz, gra eur mousc'hoarzig,  
 Elig Doue ! »

Allaz, eun devez, El ar maro  
 'Rez d'he c'havel a dremenas ;  
 En despet d'hon glac'har, d'hon daero,  
 A zivrec'h he mam he laeras !  
 'Barz en he c'horfig ken tener  
 Ne oa ken bue ;  
 Da c'hervel rejomp en aner,  
 Elig Doue !

Maryvonig, hon bugel karet,  
 Gouelan a remp d'it c'hoaz fete ;  
 Koulskoude, te zo en eürusted,  
 O veuli Doue 'barz an Ne ;  
 Oh ! 'vit da gerent glac'haret,  
 Merc'hig, ped bemde,  
 Mac'h efomp eun de d'az kavet,  
 Elig Doue !

L...

**Donèzonou d' « Arvorig »**

An dimezelled a Volz.....	50 lur.
An O. n abad Goasdoue, person Koadout....	20 lur.
An O. n abad Brient, kure Boulvriak.....	1 skoed.
An O. n abad Guillou, person Ar Chouerc'hed.	1 skoed.
Breuriez Breiz (Association Bretonne).....	50 lur.

D'ar vignoned man o deus ar vadelez da ginnig o frot da *Arvorig*, e kasomp hon zrugare kalonek. Ar pezh a c'houlenomp digant an holl hag e c'hall an holl rei d'imp eo eur c'houmanant.  
 Ar re o deus c'hoaz anean da baean vit ar bla neve, hag a resevfe eun drêten a zo pedet d'ober digemer mad d'ei.

## LEVRIOU NEVE

**Histoire de Bretagne élémentaire**, par MM. A. du Cleuziou et de Calan, avec traduction bretonne des récits.

An istor-man zo leun a varvailhou lakeet en brezoneg, vit bugale ar skoliou, herve goulenn an Otro Morelle, eskob Sant-Brieg ha Landreger. An O. Gall, person Taule, an eus grêt al labour. Grêt mad eo ar brezoneg brao da lenn hag êz da gompren. Ne gavan abeg nemet en doare-skrivan. Pegoulz eta e vo laket etre daouarn ar vugale levriou brezonek skrivet holl herve ar memes reolennoù !

**Le barde Mathalis** (Georges Le Rumeur) gant C. Le Mercier d'Erm. — Eul levrig : 40 gwenneg e ti G. Le Rumeur, rue Thiers, Azay-le-Rideau.

Mathalis a zo unan eus ar re yaouank o deus desket ar brezoneg. Skrivet an eus eul levrig *Breiz dicarvel* hag a zo leun a garante-vro. Eskouer a zo eus ar re a ro da gredi zo danve ha bue c'hoaz barz ar brezoneg.

**Sac'h ar marichal** ; — **Barnedigez Doue**, daou bez c'hoari gant an O. Adrien de Carné (Barz an Arvor). E gwerz o St-Brieg, bali Charner, 27.

Goulennet e ve alies peziou-c'hoari en brezoneg, brao da ziskouez d'ar bobl : setu aman daou hag a zo bet savet gant eun den a vicher, an O. A. de Carné. Heman ve atô skoulmet mat an tre o gantan, troc'het krenn ha berr ha displeget ken beo hag ar vne. Eur blijadur eo lenn e oberen ; brasoc'h plijadur c'hoaz o gwelet.

**An tréon ter eur**, pez-c'hoari gant Mabnoni.

Eun dolen eus ar vue pemdeiek en eur gêrig a goste Kerne. Lennet-i hag e welfet pegement e talve d'an treo disteran tremen dre blien eun den a ijin hag a spered. C'hoazzin a refet, ken reiz 'vel eo tolennet an treo. Ha gant se, n' ankouafet ket ar gomer *« ve holllet bepred, he yer ganti »*, hag a ve, pad an de, war digare ze, o fuketa porz ha ti hec'h amezien. N'e ket evelse ve kont ? An diviz penda-hen a zo ken brao-all.

Soniou ha gwerziou Breiz-Izel, gant an O. Duhamel. — E ti Rouart ha Lerolle, 29, rue d'Astorg, Paris. 10 lur.

Kaeran levr bet savet war an tonioù brezonek ; 432 ton ennan dastumet en Treger, Leon, Gwened, Kerne Tensor ar c'han ; a vo Zouden brudet dre oll.

Sant-Brieg : — Ti Moulérez Sant-Gwilherm, 27, Bali Charner.

An Evesaer : F. EVEN.

## KELOU MAD

### Eur gouel bras en Gwengamp

— *Pesort gouel ?* Eur gouel brezonek ; p'eo gwir eo *Arvorig* a embann anezan.

— *Vit piou ?* Vidoc'h, bugale, p'eo gwir *Arvorig* n'he deus ken soursi nemet kelen ha didui he lennerien vihan.

— *Pegoulz ?* Da viz gwengolo, nemet eo red stagan abred gant al labour. Eur c'hrog tenn a vo savet eno etre bugale *Breurie* ar *Brezoneg*, ha ma ve tenn ar c'hrog, ar prijou a vo kaer. Matitin, an de-all, a gomze eus rei eur marc'h-houarn, ya! eur marc'h-houarn ! — evel priz kentan d'ar bôtred, ha d'ar merc'hed, eur mekanik gwriat marteze. — Ya, eur mekanik gwriat ! Ha Matilin a ra bepred ar pez an eve prometet ober.....

Ha n'e ket hepken eun devez gouel a vo, met daou devez. Hon mignoned eus Leon, pôtrez ar *Bleun-Brug* Sant-Nouga, an O. Perrot en o fenn, a deui d'ober gouel ar *Bleun-Brug* da Wengamp ar bli-man, a-unan gant hon hini. Bet e oant pemp, diriou, o 'n em glevet ganimp ha gant otro m'eur Gwengamp. Er c'hoc'hu bras e vo savet an teatr, ha warnan, dirak holl bennou-bras ar vro, e pignfet, bugale, da gerc'hat ho prijou.

— *PED PRIZ A VO ?* emeoc'h. Eur *priz a vo 'cit pep hini*, na pa ve 500 bugel en Gwengamp, en deio-ze.

Nemet, avat, vit kaout peurz er gouel hag er prijou, vo red bean roet e hano, *arôk fin miz meurs*, da *Vreurie* ar *Brezoneg*. An holl goumananchou 5 real, abred pe divezat, a grogo *adalek miz genver*.

Eur c'hannad a dremeno hepdale dre ar parouziou tro-war-dro da Wengamp, da dastum hanoioù ar vugale.

— Penôs e vo gouveet petra vo da zeski 'benn ar gouel ?

Kement a vo da zeski a vo laket war niveren *Arvorig* miz ebrel. Ne vo ken nemet studian diwar hounnez.

## Eal Iennadeg en eur skol gristen



kerz sikour gant ar misionou, oun bet egaset alies gant eur respont deut a beurz ar mammou. Pa roen d'è an ali da lakat lenn « Buhe ar Zent » en o zi, e veze laret d'in raktal : « Ma flac'h vihan ne oar ket lenn ar brezoneg ». — « N'hall ket bezan !... Gouët a ra lenn ar galleg ? » — Ya,

sur. » — « C'hanta, neuze eo ken gouest-all da lenn ar brezoneg. » — « Han !... »

Goude bean pigoset ze d'è forz gwejou, an tad hag ar vamm n'eo ket aet doun a walc'h en o spered penôs eur bugel, 'dalek ma oar lenn ar galleg, n'eo man deski d'ean lenn ar brezoneg.

N'eus forz ! c'hoant d'in ober eun esa, setu me o vont d'ar skol gristen, eun ti kempenn, raktal d'ar Mene-Bre. Yen eo war an dosenn ; aveliou gwalarn a dremen a gouajou hag a skub ar parkeier. Daouste ha skubet e vefe gante spered breizad ar merc'hedigou a zo er skol gristen ?...

Diou glast, eta, en pep hini anè eun hanter-kant bennak : en o fenn, mestrezed-skol eus an dibab, ha tuet da lakat ar vugale da ziski.

War an dôlen-du, pe an « tablo », e skrivan, 'vit ar re vras hepken, ter frazen en brezoneg, 'vit gouët hag intentet mat e ve stumm diabarz ar yez : « Aet eo ar c'hig gant ar c'hi. » — « Me 'blij ma mestrez-skol d'in. » — « Ma zog eo freget ar voulouzen anean. » Eun droidigez e oan o c'hortoz, ha dre skrid em boa bet anei.

Ma ! Touet em bije ze ! Ter hepken a c'houveas lakat, evit ar frazen gentan : « Le chien a emporté la viande. » Ar peurrest a deue gante, a gammigellou, bep seurt traou iskiz, evel : « La viande est allée avec le chien. » Hag all...

Peadra da dapout, en beo ha war ar gwiridik, si fall ar skolaerien vihan : n'int ket 'vit harz da drei, *ger eoit ger*,

o brezoneg en galleg. Ha piou n'en deus ket klevet, en eur dremen war blasen eur gêr bennak, peziou gallek evel-hen distaget gant kanfarded o c'hoari : « La cannette est allée avec Lom » ? Ya, « est allée avec » 'zo gwall-dost da deod eur Breizad bihan o tiski ar galleg.

Da vihanan, ar frazen gentan a oa intentet. An eil a oa ive, 'met muioc'h distreset ha merzeriet e oa. Elec'h laret : « Ma maitresse me plaît », pe « J'aime ma maitresse d'école », an darn-vuian ne ouient nemet laret : « J'aime la maitresse d'école à moi. »

Ma Doue, n'eo ket pec'hed trei evelse. 'Velkent, « d'in » 'zo stag ouz « me 'blij », ha nan ouz « mestrez-skol ». N'eo ket ma mestrez-skol a zo « d'in », me an hini a blij ma mestrez-skol d'in.

An dervet frazen ne oa ket gwall-dies anei, hag eun dek bennak a lakas : « Le velours de mon chapeau est déchiré ». Ar peur-rest a lare a-dreuz : « Mon chapeau est déchiré le velours de lui ». Ordinal ha bepred an hevelep mank, an hevelep poull ! Marvat, abalamour n'ez eus ket bet laret d'ar bugel, eur wech evit mad, **E TLE AR BREZONEG OBER ANAOUDEGEZ GANT AR GALLEG E-BARZ AR SKOL.**

En eur vont a-rôk, koulskoude, e sonjen : « Sed aze mestrezed skol hag a gemer poan. Ma ! eun hanter eus ar boanze a vije espernet dre lakat ar brezoneg hag ar galleg d'en em-intent er skol. An eil a yafe da zikour egile ! .... Ha gwell eo ze ! Dont a ray tamm-ha-tamm.

Nag a skol er vro, hag e vije ezomm da lakaat enne ar galleg hag ar brezoneg da gerzet keit-ha-keit, « d'ober anaoudegez an eil gant egile ! » ! Gwellan tra o deve ar vistri hag ar mestrezed d'ober evit se eo lakat ar vugale e BREURIEZ AR BREZONEG hag ober d'è koumananti da ARVORIG. Mistri ha mestrezed, hag ho peus c'hoant e tôlfe ho labour frouez mat evit ar bloaz-man, hastet en em glevet gant an aotrou Moal da zével BREURIEZ AR BREZONEG en ho skol !

MARIAÏJE.

(*Diwar Groaz ar Vretoned*).

## AR BRAGOU WAR GAN

Fanch ar c'hemener an evoa kollet e wreg eur bla oa. N'he devoa ket lezet a vadou war he lere'h ; koulskoude, pan arruas koulz an de-ha-bla, ec'h eas Fanch da gât an ôtrou person.

- Arru on, emean, da lakat eun oferen 'vit ma gwreg.
- Mad, Fanch ; eur gwir gristen ne lez ket e anaon da yun.
- Ha da begement, ôtrou person, e teuy d'in an oferen-ze ?
- Daou skoed eo ar briz, Fanch.



- Daou skoed, otrou person ? Kerik mat a gavan oc'h.
- Ya, Fanch, met n'ouzoc'h ket houman vo eun oferen war gan ?
- Gwez d'ac'h sur, eme Fanch. Alo bôn !  
Laket e oa an oferen ha paet.  
Nebeut amzer goude, an ôtrou person a brenas danve eur bragou neve. Eun dro bennak, o tremen e kichen ti ar c'hemener, e hopas warnan :

— Deut du-man, Fanch, kentan m'hallfet ; me 'm eus labour da rei d'ac'h.

Ar c'hemener a arruas.

Pad an de, adalek beure betek noz, ne reas nemet kanan war e dorchén, ha kanan hep paouez tam ; ne gemere ket amzer, zoken, da c'hlebian e nenden.

Ar vatez a lavare d'ar person, hag ar person a lavare d'ar vatez :

— Fanch-man zo eur pôtr seder !

Pa oe arru an noz, achu al labour, debret koan ha grêt eur c'hornedad butun :

— Arsa, Fanch, eme an ôtrou person, pegement e tlean d'ac'h evit ar bragou-ze ?

— Daou skoed, eme Fanch.

— Daou skoed ? Ker eo, avat, evit eur bragou !

— Ya, otrou person, met n'ouzoc'h ket heman zo eur bragou war gan ?

— Aiôu ! Fanch, deut brao eo ganit ! eme ar person. Eur pôtr a spered out. Dal, sell aze da zaou skoed.

TREMENIAD.



## KOUE DISTER



a zo digoueeet ganec'h bean sivernet,  
— ha gant piw ne digoue ket se e  
kerz ar gouanv ? — nag a vad a ré  
d'ec'h kaout eur mouchour-godel  
fresk evit sankan ar wazig dour a  
rede heb ehan eus ho fri ? Gwir é, e  
tremen meur a hini hepklask ar seurt  
plijadur. Re goustus, m'oarvat, he

c'havont; re alies o dije da chanch mouchour; re alies e renk-  
jent hen glebian ! Marteze eo unan pe daou bemde a drem-  
menje dre o godel. Nag a gouë pe, da vihanan, nag a ver-  
vaden a vije d'ober evit o gwennan dre ma vijent laket a-  
goste !

« Ha neuze, eme Yan pe Janed, petra a dalv kas an dorn  
d'ar c'hodel evit klask ar mouchour ? An dorn-ze, meur a  
wech, n'en defe ket amzer, pe ne gav ket an tu e kreiz al  
labour, d'ober ar veaj-ze. Ha c'hoaz, ken du a ve awechou,  
gant ar mastar a ve endro d'ean, ma trec'hfe war ar fri evit  
ar pezh a zell an duan. Kwitan tra eta a zo d'ober, pa ve  
krog ar fri da diveran, eo kemer manch ar porpan pe manch  
ar gorfen evit digemer an takenno. »

Ar sort doare da didouran ar fri, evitan da vean hini Yan  
pe Janed, n'eo ket eus an dereatan. Pevien a weler, zoken,  
hag a gav ze disneu. Ha setu e seblantet bean en gortoz ma  
larin d'ac'h penôs en em gemeront evit kaout mouchouro  
sec'h ha fresk.

Breman zo eur blâ, e oan ken diouiek ha c'houi war ge-  
ment-man. Mes arlene, d'ar c'houlz ma oa yen-skorn an  
amzer, e tigoueas d'in mont d'ar skol gant Jan-Mari B. ha  
gwelet anean oc'h ober e gouë.

Mar fell d'ec'h gouzout piw eo hon fôtr — rak an istor-  
man a zo gwir pen-da-ben, — n'ho peus nemet dont da  
Wengamp ha kemer ar ru a ya eus ar Porched d'ar Vali.

Dichans bras e vefet mar n'hen kavet eno, pe o skuban, pe  
o kerc'hat dour, pe o tougen eur zammig bennak, rak bean  
an eus mil micher, pe, mar deo gwell ganec'h, n'an neus  
ken micher ebed. N'an neus ken, rak me gav d'in eo bet  
kemener gwechall. Pell zo aboue, avat, o vean m'hen  
gweler pell zo o troÿeta dre Wengamp. Ha neuze, n'è ket  
yaouank ken; eur bla bennak a c'hell kât e tuont da driu-  
gent.

Pinvik, emichans, nan eo ket. Ha nan neus ket a vez en  
em lakat e renk ar bevien. Goude ne c'houl ket an aluzen  
gant an dreminidi, e kas sonj, gwech ha gwech, d'an dud  
eus e anaoudegez, n'eo ket frank gantan an danve bevan.  
Honest, avat, ar pezh a gerfet; ze a dalv d'ean fiars an dud,  
a ro d'ean d'ober pep seurt kefridio.

Arlene, e kerz ar gouanv, e kavis anean e tu eus pont Ka-  
dolan a zell ouz Plouagor, da laret é, eun nebeudig e-mêz  
ar gêr: « Hola, Jan-Mari, emeon, betek aman e tapet  
dout ? — Ya, otro, red mad eo d'in dont e-mêz ar gêr evit  
kannan ha sec'han ma c'houë. — Ho kouë ? Hag e ret c'hwi  
hoc'h-unan ho kouë ? — Oh ! n'è ket bras ma c'houë. Setu  
aze war ar c'hê spern, a hed linen an hent-houarn, ar pezh  
am eus kannet ha laket da zec'han. » Hag e tiskouele d'in  
eur mouchour godel. M'oarvat, e seblantet d'ean bean eun  
tam souezet. — Fe, otro, emean, n'am meus mouchour ebet  
nemetan. Pa ve arri du pe c'hleb, e teuan d'ar waz a zo aze  
e traou hag hen tremenan dre an dour, pe gentoc'h, e ve  
kannet evidon, ha gant soavon, mar plij ! Rak eno e ve dalc'h-  
mad meur a gannerez. Goude, e teuan aman d'hen ledan  
war ar spern, elec'h ma koue an heol pe, da vihanan, èr an  
de. Sellet, otro, arri é sec'h. Ha koulskoude, n'eus ket ous-  
pen diw heur aboue mac'h on aman o c'hortoz. — Ma ! pa-  
sianted hoc'h eus ! Evit ma kavfet berroc'h an amzer, setu  
aze peadra da brenan danve eur c'hornad butun. »

Ar paour kêz a oa stad vras ennan. Ennon ive, o vean  
kavet eun den ken seder en e baourante. Ze am lakas ive  
ken souezet hag a stokas ma c'halon ken don ma en em laris

ennon ma unan : « Red e vo d'in diskargan ma c'halon, 'n eur gontan kement-se d'ar re all. »

Hag ar re-all a zonjen enne a oa lennerien *Arvorig*. Setu diskarget ma c'halon ha dalc'het ganin ma gir.

Breman, war ar marc'had, eun dra hag a lako laouen ma mignoned vihan. Daou pe dri miz goude ma c'hoarveas ar pez o deus lennet, e welis war eur gazeten e oa bet dekoret Jan-Mari B... gant ministr ar brezel : roet e oa d'ean medalen ar brezel 1870.

Kredet hardi e oa lorc'h ennan an de ma tougas anei evit ar wech kentan. Ha n'ê ket heb abeg, goneet ma 'n evoa anei 'n eur ober, eus e wellan, e zever a zoudard.

Gwisket faro e oa ive, hag en e c'hodel eur mouchour godel neve-flamm.

KLOAREG-AR-WERN.



### Donêzonou d'Arvorig

An otro 'n abad Carluer, sekretour-bras an eskopti,	20 real.
An otro 'n abad Jul Delangle, St-Brieg,	10 lur.
An O. 'n abad Bouliou, person Plouber,	20 real.
An O. 'n abad Corvez, person Hengoat,	8 real.
An O. 'n abad Meur, person Mousteru,	1 skoed.

Bennoz Doue ha trugare d'hon lennerien madelezus !

Levriou neve : ar miz a deu



## Breiziz Kadarn <sup>(1)</sup>

*Paul Henry, ofiser war vor (1876-1900)*

Paul Henry a oa ginidik e dad eus Pempoul, nemet e teuas hen war an douar en kêr Anje, elec'h ma oa e dad mestrekelenner er skol-veur. Heman a dizroe bep bla, gant e vugale, da dremen an hanv en Kergrist, eun ti koant an evoa e kichen Pempoul hag e kane ar mor e toull e zor.



Ar zon-ze a glevas ken alies pa oa bugel, a douellas Paul ; abred e santas e oa galvet da vont war vor. Pa ne vije ket en Breiz, e spered a dizroe da gât ôchou Pempoull hag en eur invori, barz ar mor, e c'holoe e gañterou skol a furmiou listri ha bagiou.

---

(1) Kadarn, courageux, vaillant.



Da bevarzek vlà, e oe kaset da di Jezuisted Jerzey d'ober e studi da vont d'ar Borda. Tri bla goude, e oa digemeret er Borda hag en em roas gant kement a galon d'al labour ma oa ofiser abenn daou vla.

Diou veaj a oe kaset d'ober war an « Jphigénie » hag ar « Melpomène » ; goude ec'h eas d'ar C'hret, hag ac'hane e tizroas d'an Oriant, d'ar skol ofiser-fuzuilher. Goneet gant an renk kentan, e oe hanvet war an « d'Entrecasteaux » a oa neuze en Saïgon. Pan arruas ar c'helou ze gantane oa en Anje gant e dud. Lampat a reas da bokat d'e : « Kaerat dêrou mad ! emean. Ec'h an ar wech-man d'ober tro ar bed !

Eul lestr treizerez a gasas anean betek Saïgon ; eno e kavas an « d'Entrecasteaux » prest da vale trezek an Tonkin hag ar Japon. Eus ar Japon e skoas da Borz Arzur elec'h ma oe digemeret kaer gant ar Rused, hag ac'hane d'ar Chin.

An 22 a viz mae en em gawe en porz mor Tchefou, pan arruas kelou eus Pekin, kêr-benn ar Chin, e oa bet muntret hanter-kant kristen eus ar gêr-ze hag e oa an holl Europeaned e riskl o bue.

Hanter-kant martolod eus an « d'Entrecasteaux », kemend-all eus an « Descartes » a oe dibabet evit mont da zifen ar gristenien. Paul Henry a c'houlennas kerzet gante.

Eur wech arru en Pekin, e oe dispartiet e labour da bep hini. Roet e oe da Henry eur c'harter a-bez da vêsat, ar Pe-Tang, elec'h ma oa an eskopti, an iliz-veur, tier ar visionerien, ar c'hloerdiou, ar skoliou ha kouent leanezed Sant Visant a Bol. Tri mil pevar c'hant kristen, gwazed, merc'hed, bugale, a oa 'n em dastumet e diabarz ar voget vras, eun hanter leo hed, a re an dro d'ar Pe-Tang.

Bue ar re-ze holl o oa laket etre daouarn an ofiser yaouank da viret ouz tôliou ar Bokserien, paganed diroll, muntreien euzus kounnaret eneb ar gristenien. N'e ket d'eul lein-eured e oa kaset di : difenn gant 30 martolod eur c'harter kement hag eur gêr ha 'n evoa harz ebet na difenn, netra nemet eur vager izeloc'h 'vit an tier diwardro !

Koulskouïe, Paul Henry ne fallgalonas ket. Stad a oa

ennan, kentoc'h, o welet e oa galvet da zifenn misionerien, leanezed ha kristenien Pekin hag e prometas, dirak Doue o difenn betek mervel.

Kentan reas oe ober eun dro diabarz, gant an daou eskob, an O. Favier hag an O. Jarlin, ha pa 'n evoa gwelet e pe stad e oa an difennou, e lakas ober pep seurt labouriou 'vit o c'hrenvât.

E tu-hont d'e dregont martolod, e savas ive soudarded etouez ar gristenien ar muian barrek da vont d'an emgann ; eur c'hant a oe dibabet hag armet gant pep seurt bevion, rak ne oe kavet nemet dek fuzuilh er Pe-Tang.

A ziavéz, ar Bokserien a direde a vilierou 'vel bleidi endro d'eur vanden denved. An impalaerez ha devoa grêt promese d'o c'hastizan, mes eun dreitourez ne oa ken, rak dre zindan eo hisan ane an hini rê war ar gristenien.

An 11 a viz mezeven, eur Japoniad a renk uhel a oe lazet war ar ru ha tennet e galon dioutan. An tân a oa war gregi. Endro d'ar Pe Tang, ar Bokserien a lemme o dent. Ar 15, da seiz heur noz, e lammjont gant ar mogerioù, ar c'hef tân 'n eun dorn, ar c'hleze en dorn-all. Paul Henry ha seitek martolod gantan a oa o c'hortoz ane drek an nor-dal.

Pa dispakjont war hed tenn : « Tân ' emean. Seitek tenn a strakas, seitek Bokser a goueas. — Tân ! emean, eun eil gwech. Ha seitek Bokser adarje d'an traou. Ne oant ket vit tostet. Pa dec'hjont, e oe gwelet e chome war o lerc'h seiz ha daou-ugent korf maro ; pemp ha hante-kant tenn a oa bet loskaet. Ar c'habiten a oa laouen. Peb a dri-c'hant daou-ugent tenn an evoa pep martolod ; 'benn e vije devet kemend-all a boultr, marvad e vije skuizet ar Bokserien, pe e vije arru sikour gant ar Fransijen. Esperanz vad a oa, diwar an tôl-man, da dec'hel rak ar maro. Ne oa ket brao kouean etre daouarn an enebourien. Eur c'hristen tec'het diouz ar Pe-Tang a oe paket gante, diskroc'hennet en beo ha laket e benn hag e groc'hen demdost d'ar magorioù, d'ar gristenien-all da welet.

(Ar fin ar mis a deu.)

## PIOU 'LIPO AR POD ?



'an advern e vér o c'hoari e ti Per  
Lein-ar-c'hoat. E penn an döl, eman  
Jozeb, ar mab henan, neve dizroet eus  
ar zervij, ar mevel bras en e genver.

Louichen a gav ésoch bean azeet  
war ar bank. Tinig a ra stamm 'n eur  
diwall eus an dour skler a vo laket  
kafe ennan pa vo skarzet an ti gant  
ar bôtred.

Per, ar mestr, a rost ar gwellañ ma c'hell eur c'hornad  
butun karot, ha Dorig a lenn d'an ar journal, da c'hortoz ribo-  
tat.

Mari, hi, a denn al léz eus ar brenn-yod evit hen lakat er  
ribot. Mes arök rinsan ar pod, e kas anan d'he zad. Setu aman  
ar pez a dremen neuze.

*An tad.* ar pod gantan etre e zaouarn. » — Jozeb, c'houi  
'lipo ar pod ?

*Jozeb.* — 'Ran ket laouen, ma zad ! Krog on da vutinat.

*An tad.* — Bön, avat. Ha c'houi, Louichen, c'houi 'lipo ar  
pod ?

*Louichen.* — Nan, ma zad, achuet am meus.

*An tad.* — Tinig, c'houi 'lipo ar pod ?

*Tinig.* — Trugare, ma zad, ec'h on o evesat na deuo an  
dour en tan.

*An tad.* — Dorig, ma mab bihan, c'houi 'lipo ar pod ; p'e  
gwir e plij an treo dous d'ac'h, c'houi 'lipo ar pod.

*Dorig.* — Trugare, tata, me 'lipo ar vaz-ribot, bremaik.

*An tad.* — Feta 'vad, Mari, ma merc'h vras, c'houi a vo red  
d'ac'h lipat ar pod !

*Mari.* — Öh ! ne rin ket, ma zad ! D'ac'h eo d'hen ober.

*An tad.* — Ma, velkent ! Setu me intanv eiz vla 'zo hag eman  
red d'in aboe bemde lipat ar pod ! Mar n'eo ket eun drue !

Ha gant e viz, an tad, joa ennan daoust ma seblant fached,  
a lip ar pod rac'h-net, gwelloc'h evit eur c'haz.... Gret an nije  
darbodou, mar 'nije bet dichanset d'eun all kemer e lod.

MABNONI.

Sant-Nikolas-ar-belen, ar 6 a viz c'hovevrer 1914.

## KIMIAD

*Kinniget da H. K. (LANGONNET).*

*Red e din-me kuitat ma bro ger, Red*  
*e din-me monet pell doch ar ger. Keno dach-hu,*  
*ma mam ga-ret, Ma mam gla-cha-ret.*

Red e d'in-me kuitat ma bro ger,  
Red e d'in-me monet pell doc'h ar ger.  
Keno d'ac'h-hu, ma mam garët,  
Ma mam glac'haret.

Disul vintin, goude 'n oferén,  
War ve ma zad, eur wech c'hoaz e peden.  
Keno d'ac'h-hu, ma zad karec,  
Brema er vered.

Ma breur Even ha ma c'hoar Anna,  
Ouz ho kuitat, ma c'halon a ranna,  
Keno d'ac'h-hu, n'ho kwelin ken,  
Oh ! nan, birviken !

Ar bodig brug, el lann diwanet,  
Na groga ken, eur wech a ve tennet ;  
Me eveltan, e mez ma bro,  
Me a zizec'ho.

Klevet a ran kan an alc'houeder,  
Labousig mad, e galon zo zeder.  
Hen a chomo en Breiz-Izel,  
'N e vro Breiz Izel.

Lies ive, war ar roz da véz,  
Me 'm eus kanet, kanet hed an devez,  
Kanaouennou ma Breiz-Izel,  
Ma bro Breiz-Izel.

Mineou du, dreist-oc'h, pell du-ze,  
'Vel eur voul dan, an heol-hanv a guze....  
Mineou du ma Breiz-Izel  
Ma bro Breiz-Izel.

Koat Lein-Ar Ster, elec'h a grenen,  
Goude serr-nouz, pa vijen o tremen...  
Koat Lein-Ar-Ster, koat Breiz-Izel,  
Ma bro Breiz-Izel.

Gwazig vihan, a glevan 'vrudi,  
Ouzoc'h ive me 'z a da gimidi;  
Gwazig vihan ma Breiz-Izel,  
Ma bro Breiz-Izel.

Prad ar Genkiz, ennoc'h e welen  
Bokidi koant, ru, gwenn, glas ha melen...  
Bokidi koant ma Breiz-Izel,  
Ma bro Breiz-Izel.

Lann ar vilin, lann vras Barregan,  
A-hed an hanv, ennoc'h ar skrih a gan...  
Lann ar vilin, lann Breiz-Izel,  
Ma bro Breiz-Izel.

C'houez ha c'houez vad a zav en pep tu,  
Gant foen troc'het ha gant bleun gwini du...  
C'houez ha c'houez vad ma Breiz-Izel,  
Ma bro Breiz-Izel.

Leur-gér Talroz, glas 'vel eur flouren,  
Leur-gér Talroz elec'h e c'hoarien!...  
Traou dremenet!... ha na 'z eint ken  
Endro, birviken!

Oh! pa zonjan en traou dremenet...  
Ma c'halon baour, ma c'halon zo zammet!  
Traou dremenet ha na 'z eint ken  
Endro birviken!

Arc'hoaz vintin, savet mintin mad,  
Me 'm o kuitét ha kuitét 'vit dalc'h-mad!  
Keno d'ac'h-hu, ma Breiz-Izel,  
Ma bro Breiz-Izel!...

A. PORZER.

Mine-Morvan, 27 a viz ar Foen 1913.

## BUE AR VREURIEZ

### Prijou ar Vugale

#### GOULENNOU

- I. — Hanvan 9 stér a Vreiz ha peb a gêr vras warne.  
— Hanvan 3 Vreizad brudet marvet er c'hantved divezan ha laret petra o deus grêt 'vit ar Vro, lizerennon kentan o hanoioù o vean B... K... G...
- II — Tarigos tarigosig,  
Goloet a vil bosig,  
Ha du oll nemet e rêr,  
Hennez zo eun tarigos kaer.
- III. — Tri gir karre :  
Ar c'hentan, eun hano mat da bep krouadur ; an eil, eul loen bihan a ra e chomaj er poullou ; an trede, labour an alar er park.
- IV. — Na mab na merc'h n'en eus ganet mam  
Hag an eve klevet ar goukou o kanan goude gouel Yan.  
Perak ze ?

#### PRIJOU

Setu ar re o deus prijou :

- Kentan priz : Germaine Gouriou, Plouagor.  
Eil priz : Yves Raoul, Maël-Keraez.  
Trede priz : Jean Page, Plouagor.  
Pevare priz : Eugène Gouriou, Plouagor.  
Pempvet priz : Yves Clévéde, Maël-Keraez.  
C'houec'hvet priz : Pierre-Louis Guillou, id.  
Seizvet priz : Jean Cocaing, Pleuveur-Bodou.  
Eizvet priz : Pierre Taton, Plouagor.  
Navet priz : Félix Bescond, id.  
Dekvet priz : Auguste Le Moal, Maël-Keraez.  
11<sup>et</sup> priz : Théophile Olivier, Maël-Keraez.  
12<sup>et</sup> priz : Joseph Le Gac, id.  
13<sup>et</sup> priz : Pierre Queinnec, id.  
1<sup>an</sup> accessit : Joseph Julien, id.  
2<sup>et</sup> accessit : Henri Francis, id.  
3<sup>et</sup> accessit : Jean Bozec, id.

4<sup>et</sup> accessit : Marie Cocaign, Pleuveur-Bodou.  
5<sup>et</sup> accessit : Euphrasie Rivoallan, Plouagor.  
6<sup>et</sup> Amélie Taton, Plouagor.

..

Ar prijou gonezet gant ar re 'man o hanoioù uheloc'h :

1<sup>an</sup> priz : Ugent real hag eur c'houmanant da *Feiz ha Breiz*.  
2<sup>et</sup> : Eul levr Bleuniou Yaouankiz.  
3<sup>et</sup> : Eul levr Mouez meneou Kerne ha kartennou.  
4<sup>et</sup> : Ma Beaj Jerusalem.  
5<sup>et</sup> : Mouez meneou Kerne ha kartennou.  
6<sup>et</sup> : Ma Beaj Londrez.  
7<sup>et</sup> : Eur c'houmanant da Feiz ha Breiz.  
8<sup>et</sup> : Mouez meneou Kerne.  
9<sup>et</sup> : Peziou-c'hoari Mabnoni ha kartennou.  
10<sup>et</sup> : Kanaouennou Treger ha kartennou.  
11<sup>et</sup> : Peziou-c'hoari Mabnoni.  
12<sup>et</sup> : Pipi Gonto.  
13<sup>et</sup> : Kanaouennou Treger.  
Evel « accessit », e vo roet An Trêr ter eur, tólennoù, peziou-choari neve.  
Kaset e voint hepdale.

MATILIN.

(DA HEULH)

Sant-Brieg. — Ti Moulerez Sant Gwïtherm, 27, Bali Charner.

An Evesaer : F. EVEN.

## SENT BREIZ

Er miz-man eo bet grêt gouelioù : **SANT GWENOLE, ST. PAOL, S. PATRIK**, abostol an Iverzôn.

En miz ebrel e vo gouelioù : **S. VISANT FERRIER** (ar 5) ; an den eürus **GRIGNON** a **VONTFORT** (an 8) ; **S. PATERN** (ar 16).

Diwar vrëman, en Breiz, gouelioù ar zent breton a vo grêt d'o de, en iliz hag er breviel. Hon Tad Santel ar Pab an eus hen gourc'hemennet. Bennoz Doue d'ean ! Hon zent a vo laouenoc'h en nenv ha galloudusoc'h war an douar. Hag ar Vretoned o welet o zent koz anaveet hag enoret gant an Iliz katolik en em stago oute hag outi mui-ouz-mui.

Ar Pab Pi X an evo roet aman eur gwall-zikour d'an emzaou brezonek.

*Ar pesk bihan a rei e gresk*

*Mar n'a ket an andon da hesk...*

*Darn eus hon lennerien n'o deus ket c'hoaz paeet o c'houmanant. Unanig bennak o deus respontet ne baejent ken. Ar re-ze omp souezet gante. Pe n'eo ket kreno aualc'h o yalc'h, pe n'eo ket kreno aualc'h o c'hreden 'barz ar brezoneg? Neus yalc'h ebet ken dister ha n'hallfe skoulman goude paeat 5 real pe 8 real ar bla evit Arvorig !*

*Nan, ni gred penôs ar re o deus loskaet Arvorig, joude eur blu hepken, a zo kentoc'h tud re dêr, re bras c'hoant d'e da welet al labour grêt en eun tol...*

*Pa o deus gwelet nemet petra he devoa grêt Arvorig, o deus kemeret fae hag o deus miret o gwenneien... Ma, 'velkent ! True hon deus outi ! Grêt he devoa gwellan m'he devoa gallet, laket he doa en he fenn ober gwelloc'h c'hoaz 'vit ar bla, ober eur gouel bras, sevel eun emgleo elre Treger, Leon ha Kerne. ha setu e teuer da lemel an dorn diganti !*

*Me ho ped, mignoed, na vezet ket re dêr ! Gortozet eun tam gantimp ! Bet sur ne lakfomp ket hon zaou droad er memez botez, mes hon digarezet ma n'hon deus ket kavet c'hoaz an tu da vont primoc'h. Gortozomp ar pi da bouc'hat ; eno eman an tu d'ober souben ead.*

## Ar c'havrig torret he c'horden ganti

Eur wech e oa, ha ne oa ket, hag e oa unan bopred.

Hag e oa eun den, e hano Lommig, hag a blije geve d'e an. Tam chans ebet, avat, n'en evoa gante. Koll a rê ane tout, hag er memez stumm : ar c'havr a dorre he c'horden, a skoe trezek ar c'hoad du, hag eno e vije taget gant ar blei. 'Oa ket a voën da harz : na lazigou he mestr, nag an aon rak ar blei, ne rênt van ouz seurt ebet. Librente, frankiz 'n hini vanke d'ar geve kez.


Ha Lommig paour, ha ne gompene man 'barz ijin al loened, a oa mantret : « Fin zo ! emean ; ar geve a gav hirr an amzer 'n em c'hichen ! Hini ebet n'hallin mirout ! »

Koulskoude, ne gollas ket kalon. Goude bean kollet c'houec'h gavr e giz-ze, e prenas unan all, ar zeizved, hag e prenas anei bihan bihan, evit ma teuje da gustumi gwelloc'h outan. Oh ! mabig, na koant e oa gavrig kêz Lommig ! Na koant e oa, gant he daoulagad souezet, digor bras, 'vel boutonou chupen, gant he barvig a zarjant, he zreit munut hag he botou lufr ! Hag he c'herniou marellet 'ta ! Hag he bleo hirr ha flamm 'vel mouchouer eun dimezel, de eur pardon !

Ha neuze, jentil oa ar c'havr, ha chom 'n he zav d'ober kêzig : ha lezel an nen da c'horro anei hep finval, kuit da feukan he zroad er skudel. . . . Eur berlezen a c'havrig ! . . . Gwennig a oe hanvet.

Lommig oa drek e di eul liorz, eur gouriz spern-gwenn endro d'ei. Ebarz al liorz e oe laket ar c'havrig da beuri. Staget e oe ouz eur peul, er gwellan korn, ha kalz a gorden lezet d'ei da redek, hag eur wechig an amzer e teue Lommig da welet ha hi vije mad ar bed ganti. Ar c'havrig a oa seder ha peuri rê herrdan m'helle, ken e oa trellet Lommig kêz. « Arsa, benn ar fin, emean, setu aze eur c'havr ha ne gavo ket hirr an amzer du-man ! »

'N em dromplan rê ; ar c'havrig a gavas hirr an amzer. Ya, Gwennig a gavas hirr an amzer . . . Set' aman penôs e oa bet kont. Eur beurevez ma oa stag ouz ar peul, evel kiz ha kustum, e tôlas eur zell war ar mene, pell du-hont. Hag evit ar wech kentan e sonjas : « Memes tra, me zo sod awalc'h o chom aman, goude pegen brao eo bean du-ze ! . . . Yeoten dru ha flour, ha hini fresk bemde ! . . . Elec'h n'en eus aman nemet peuri pikagn, ha treuz yeot, ha kôlmalo, ha c'houez ar c'hoz gante c'hoaz ! »



Ha hi da jaehan war ar gorden . . . Re deo eo, siouaz, hag he dent zo re wag . . . Aze renko chom ! Ne beure ken, avat, ne rê man nemet laret bê ! bê ! bê ! ken kevanus ken oa eun drue klevout anei, hag e lare an dremenidi : « Kelou fall a zo gant ar c'havrig ! »

Ya, kelou fall a oa gant ar c'havrig. Benn e oa noz anei,

he gougig flamm a oa hanter-gignet. Ar c'hraou a gave d'ei a oa tenval-sac'h ; taken ebet ne gouskas.

An de warlerc'h ar beure, abred, e teuas Lommig da c'horro e c'havrig.

Azeet e oa dija war e skaon tri-droadek, pa glevas, — o sant Joran gez ! — pa glevas Gwennig o kôzeal. . . . Breman, bugaligou, kôzeal ne ra ket tout ar gever, mes houman a oa eur c'havrig seurt a zo nebeut. Hag e lare dousik :

— Otrou Lommig, me fell d'in mont du-ze d'ar mene da vale !

— Pesort ? eme Lommig. — Ken spouronnet e oa ken e koueas ar skudel digantan hag e fôtas al lêz. — Pesort ? Te ive mont d'ar mene da vale ? Arsa, petra c'hoarve gant ar re-man tout ?

— Me n'oun ket, ôtrou Lommig ; re hirr e kavan an amzer.

— N'e ket frank awalc'h al liorz d'it, marteze ?

— Oh ! g' eo da, ôtrou Lommig !

— Astennet e vo d'it ar gorden ?

— Oh ! dalv ket ar boan, ôtrou Lommig.

— Petra a vank d'it eta, ma bichik ?

— Krapat war ar mene du-hont, ôtrou Lommig.

— Mes, paourig kez, du-hont eman ar blei, dent hirr ha lemm d'ean ha kof goullo. Hennez ne rei nemet eur c'he-naouad diouzit !

— Feta ? ôtrou Lommig. Me am eus kerniou mad ive ! Me en em zifenna !

— Te ? En em zifenn ? Yê da ! Mont eur c'havrig munut eveldout da c'houren gant eul lankon a vlei du ? C'houec'h eveldout am eus bet dija hag o c'houec'h ec'h int tec'het diganin, hag o c'houec'h ét d'ar mene, hag o c'houec'h lonket gant ar blei du. Diwean hini ane, end-eün. Rouzig he hano, oa eur ganfanten a c'havrig, lart ha reut ha drouk evel eur boc'h.

Tourtet he deus epad an noz, gant ar blei, ha memez tra, diouz ar beure, eo bet taget gantan !

Hag az teve c'hoant, te ive, da vean lonket war o lerc'h tout ?

— Mar plij, ôtrou Lommig, lezet ac'hanon dont ! Ne vin ket lonket, gwelet a refet !

Han ! an dro-man, an « ôtrou Lommig » a fachas krenn, ken e sklokas e votez koad war leuren ar c'hraou.

— Ma ! nan i ket, pa laran ! Ar re-all zo bet debret ; te, bopred, ne vi ket ! Aman chomi, ha me a ziwallo ac'hanout dre an despet d'it !

Ha gant an droug a oa ennan e lezas eno skudel ha skaon, e serras an nor war he c'hein hag e prennas anei 'n eur c'hrozmolat : « Me a zesko ac'hanout dont d'ar mene da vale ! »

*Ar pennad diwean ar miz a deu.*

TADIG.

## EUR VARNEDIGEZ KAER

D'ar c'houlz ma oa Breiziz neve-arru en Arvor, e oant, eun de, pôted eur plou, o hinjan avalou. Unan a oa ét war ar ween ; eun all e traou, a zerre. Eur bod a dorras hag e koueas an hini oa e krec'h war gein e gamarad ha lazaz anean mik. Hen, avat, 'n evoc ket a zroug.

Tud an hini maro a yeas da gât ar pentiern : 1000 lur a c'houlennent evit o digoll pe bue an torfetour. Heman ne oa ket evit paean ; mervel a renke. Neuze ar pentiern fur a lavaraz :

— Mad eo ! mervel a renk an torfetour ; mes red eo e vefe lazet e-unan vel ma n'eus lazet e gamarad. Pignet eta er ween, unar ac'hanoc'h, ha 'n em dôlet war e gein.

Den n'houllas pignal er ween, hag evelse e chomas e vue gant ar paour kez.

## AR VUGALE HAG AN EVAJ KRENV

### Komz kaer eur bugel

Eur pôtr bihan eus enezEusa hag a oar pen-da-ben e gatekiz, goul ha respont, a oa bet kinniget d'ean er gêr, eun de bennak ma oa tud o prejan, eur banne « cassis ».

— N'houllan ket ! emean ; rak me zo 'barz ar Groaz-Wenn.

— Teus ket sinet ar paper c'hoaz ! a oe lavaret d'ean.

— N'eus forz, eme ar pôtr, roet am eus ma gir !

Kaerat respont abeurz eur bugel 8 vla !

En kalz parouziou eus ar Finister eo savet ar Groaz-Wenn, Breuriés eneb an evajou krenv, hag eleiz a vugale a ro d'ei o hano.

**Tud ha treo ar Vro**

## AN NOZVEZ DIWEAN

An amzer zo sioul evel ar maro, mac'h ha pounner evel eur men-be, tenval evel eur vantel a ganvou displeget war gêr Landreger a-bez.

An iliz-veur, unan eus kaeran ilizou Breiz, bro an ilizou kaer, an iliz-veur hag a vije ken sklêr gwer rozennet he fenestrou er blavezioù-all gant ar goloio binniget a vije o sklerijenni ôter an Itron-Varia 'pad pedennou noz miz Mari, a zo du ha tenval he zal. Skuilh e ra daerou a c'hlac'har war be gloriüs an O. Sant Erwan vinniget ha war zent menerez he forched, peziou labour piket ken fin, kizellet, moulet ken plen ha ken flour gant daouarn ijinus, daouarn kristen ar Vretoned, bruzunet, malet ha minset breman gant krabanou diskiant, krabanou digristen lapoused Etampes. Ne glever ken soniri drant ar c'hleier badeet o kas peden an Anjelus, peden an arc'hêl Gabriel dreist ar zaonennou dôn hag an traouiennou glas, da digas sonj d'ar gristenien da zaludi, war an dro gant an êle, o Mam a zo en nenv.

An daou gloc'h brasan, kloc'h an O. Sant Tual ha kloc'h an O. Sant Erwan a zo bet torret ha teuzet; ne van ken en kamb ar c'hleier nemet ar c'hloc'h *Baltazar*, kloc'h an eskob Baltazar Grangier, ha c'hoaz ne ve divridet nemet da c'hervel ar reneaded da zont da welet an doueez a c'hiz neve, eur strakel, eul libouden divezet eus kêr azeet war ven zakr an oter santel, oc'h ober ardou, ormidou, dirak eun toullad marmoujen, skukadur, dilostadur ar broiou-krec'h.

Elec'h bean lezet da vont da gimidi diouz he bugale, d'o briata, d'o stardan eur wech c'hoaz war he c'halon, elec'h bean lezet da grial, 'n eur dremen, d'he fôtrig bihan :

« Deus etre diourec'h da vam gez deus da zouget, ma bugel !  
Deus war varlen, deus war galon da vam, mabig, kent mervel ! »

ar vam baour, beuet he ine en eur mor a dristidigez a zo

kaset dre eun hent distro ha paket en leandi ar Baulinezed laket d'ober eur prizon.



« O Salver binniget, kri, kalet e kavan ma flaneden !  
Dousoc'h ha berroc'h am ije kavet ma nozvez diwean gant  
ma bugale endro d'in ! Koulskoude, ô ma Jezus, roet d'in  
an nerz am eus ezom d'evan c'houervder ma c'halei betek al  
li, en eur vervel pell diouz ma fried ha hep gwelet ma  
bugale ! Ya, ho polante bezet gret ha nan ma bolante me !  
Grêt ma trec'ho ho mouez, ho karante war mouez ar gwad ;

grét ma roin d'ac'h bue evit bue ! Kemeret ma bue evit brasan gloar Doue an Tad, evit brasan mad ma fried ha ma Bro !... »

N'eo ket peurc'hret he orézon ganti ma klev an nor o trei war he widuren hag o tigeri ha golo eul letern-kuz o tól bannou sklerijen e kreiz tenvalijen he frizon. Daou eus ar varnerien, mez ha morc'hed d'e kas d'ar maro perlezen ar gwraze fur en Landreger, eur vam didamall a bep hent, a zo deut dre laer, a noz kaer, d'he likaoui da glask ober d'ei en em zislavaret.

— True, eme, true ouz ho pugale a vefe ken kerse gante dioueret o mam ha menel emzivadad etre treid ar bed, yaouank ha youst evel mac'h int !

True ouz ho pôtr bihan a zo c'hoaz war ar vronn, a zo neve grog da vouse'hoarzin ouz e vamm ! Eur gomz hepken da dianzav an daou veleg kavet en ho ti, da lavaret e pleget da lezennou ar vro, hag e vo espernet ho pue hag e vefet lezet da vont gant ho pugale a zo o huanadi, o hirvoudi tri pe bevar de so warlerc'h o mam !

— Roet peuc'h d'in gant ho likaouerez ! En gwir gristenez am eus bevet ; evel kristenez ho peus ma barnet d'ar maro ; en kristenez e varvin ! Kentoc'h mervel evit bean treitourez da lezen zantel Jezuz-Krist ! Bugale eur vam hag a ro he bue, he ine da Jezuz-Krist, gwir vignon ar vugali-gou, ne vefont ket dilezet gant an Otrou Doue, ar gwellan eus an tadou. An tad dispar-man hag an eus ar vadelez da rei o zam bruzun, o zam brigoj bemde d'an evned bihan ha da wiskan lilien ar zaonen kaeroc'h evit ar roue Salomon gwisket en e gaeran, an Doue madelezus-se ne dilezo ket ma bugale ; nag an Itron-Varia Koatkolvezou ; nag an O. Sant Erwan, tad ar vinored hag an emzivadad, n'o dilezo ket ive. Mont e rin eta da zinan, da verkan gant ma gwad testeni ar garante a dougan d'am fried, d'am bugale, d'am Bro ha da Zoue.

Eun dra hepken diganae'h a c'houlennan, ma dilhad eured da vont d'ar maro, pe, gwelloc'h, d'ar vue peurbadus. Ha breman, kenavo ho kwelet adaric ; nozvez vad d'imp holl ha Doue da bardono an Anaon !

Trec'het gant ar furnez hag ar wirione, an daou varner fôz ha disteal en em lip, en em zil mezek ha pinous d'o zoull du evel daou deûz.

Du-hont, e krec'h ar baradoz, an O. Sant Erwan, holl sent ha sentezed Breiz-Izel a verv, a ya hag a zeu dre balez an Drinded, o klask ar c'haeran danvej ar pinvidikan perlezennou da beurgaeraat kador ha kurunen prizonierez santel leandi ar Baulinezed, pad eman war an douar he bugale o hunvreal en o mam a welont dirake evurus ha joaus e kreiz eur sklerijen lugernus.

EUR MIGNON.

(D'achui ar miz a deu).

---

## Helibini

Fransez ha Pier-Mari zo o c'hoari o-daou. Fransez a zo bras ha teo ; Pier-Mari a zo bihan ha moan.

— Klaoustre (pari), eme Fransez, ne dremen ket lec'h e tremenin me ?

— Grin, avat ! eme Pier-Mari.

— C'hanta, kerz 'n ez sav aze ha digor da ziouhar.

Kerkent, ha Fransez war e grabanou hag o tremen etre diouhar Pier-Mari.

— Tremen dre aze breman ! emean.

---

## GOULENNOU HA DIVUNADENNOU

Petra dap an hini dap ar big ?

Penôs lemel 1 eus 19 ha kêt ugent ?

Pere ar mein zo ar mujan 'barz ar stank ?

Ar c'had a goust 20 real ; ar c'honfi 4 real, ar glujar, 1 gwenneg. Penôs ober 'vit kêt 100 loen gant 100 lur ?

Priz : Eul levr *Marvailhou Neve*, Klaoda Prat, leun a skeudennou Kas ar responchou 'benn an 20 a viz ebrel da E. Ar Moal, Koadout.



## ALUZEN TINTIN MARIJAN

Tintin Marijan ne ouie ken hec'h oad. Ken pell e oa arru diouti he blaveziou kentan, ma n' halle ket he lagad gwelet keit se ken. Kropet, krommet, daoudortet, 'vel eur ween goz gant an tóliou-avel, ec'h ee, a zor da zor, harpet war he baz, da glask peadra da beurasten he zamm bue betek lec'h ma oa laket d'ei tapout.

— Oh ! emei, n'in ket a-bell ken ! Me zant e fallaan bemde ! N'ou ken evit sevel ma zroad dreist d'eun treujou... N'on ken 'met eur grenez, eun danserez seurt ec'h on-me bet gwechall.

Rak tintin Marijan a oa bet, emei, eur ganfanten. He fried kentan, marvat, pa ne gerze ket eun.....

— Ped gwech dimezet oc'h bet 'ta, tintin Marijan ?

— Fe d'am zoupen, ter gwech on bet dirak an ôtrou person ! Breman n'in ken nemet dirak an Otrou Doue.

Pan n'hallas ken bale a-bell, tintin Marijan a goueas stankoc'h war choug hec'h amezeien nesan. Tri diad e oant, hag e kustumas goulenn digant pep hini eur zunvez boed. N'e ket ar pezig a yee ganti, ar baourez kêz koz ! Eur banne léz ribot, eun tam bara, diou pe der vozad avalou-douar !

Eul lun bennak, e oa he zro da vont da di an Teur. Pa deuas en ti, e oa ar wreg war an oaled gant he bugel yaouankan, bet badezet ne oa nemet pemzek de.

— Ma fe, 'mei, tintin Marijan, breman, pa 'm eus unan ouспен da vevan, n'hallas ket derc'hel da rei d'ac'h ken stank-ze ; red eo d'in sonjal ive 'barz ma bugale.

An hini goz oa falloc'h an de-ze evit an deiou-all ; dihelkal a rê o tont en ti ; he baz en he dorn a grene hag e vranskelle o klask harp. Ne respontas gir, nemet ober eur zell warzu ar c'hrouadur, an hini a oa deut da lemel he zam diganti, ha mont erméz.

An de-ze ne debras tam.

Ne gredas ket mont da c'houl da di hec'h amezeien-all, pa ne oa ket o zun da rei d'ei.

Benn ar zadorn, e oa maro.

Gwreg an Teur a lavaras e oa eun dizamm kaer evit an

holl, mes dreist-oll, eviti, rak hi he devoa bugale yaouank ha ne oa ket en he êz magan peorien diouz ar zun.

\* \* \*

Daou viz goude, — 'benn neuze ne oa ken chomet en zonz hec'h amezeien eur vogeden envor eus ar paour kez tintin Marijan, — da zaou viz goude, gwreg an Teur a oa ét da gerc'hat he zaoud, o lezel he bugel kousket en e gavel war an oaled. An nor hag ar fenestr a brenas kloz hag an alc'houe a gasas ganti.

Gwa'll souezet e oe, pa dizroas, o welet digor frank dor an ti. Eun tol a skoas en he c'halon o sonjal en he mab. Ha hi da redek da welet. Ar c'havel a oa bet dizoloet hag eur wreg, stum koz warni, a oa 'n he c'hoaze war an oaled, ar bugel ganti war he barlen. Ar vam a lampas d'he c'hât :

— Petra ret da hennez ? emei.

Mes pa welas dremm ar plac'h koz, e loskaas eur skrifaden euzus hag e semplas, hed he c'horf war leur-an-ti.....

An amezeien holl a diredas, liou ar spont en o c'herc'hen.

Dal ma teuas bue er vam, en em lakas adarre da grial-forz, da c'hervel he mab, 'vel eun den troet e spered.

Unan bennak a yeas neuze betek ar c'havel hag a grogas er bugel d'e digas d'ei. Yen-sklas e oa ha reut e izili.

Tintin Marijan oa bet o kerc'hat hec'h aluzen.

D'ar paour en e ezom,  
Roet bepred tam pe tom.

D. N. D.

## Sant Nikolas hag an tri vugel

Burzud sant Nikolas. — An trêñ ter eur. — Eun tammig krog, tri bez-c'hoari neve, gant Mabnoni. E gwerz, 27, bali Charner, Sant Brieg

An tri bez-man a zo laket en eul levr. Komzet hon deus dija eus an *Tren ter eur*, pe zentus ha livet henvel-beo ouz ar wirione. « Eun tammig krog » a zo ken beo-all kanfarded o c'hoari zo savet brech etreze war digare trucheri. C'hoariou kanfarded zo tra serius, fell ket 'n em dromplan, koulz vel eo e aferou d'eun den bras. Vit kele eur bouton ! — Ar boutonou-ze eo ar c'hant ar bugel : ar re-ze eo e densor. N'e ket souezus o difennê. *Mabnoni* an eus tapet Gwillherm, Yvon, Dor, Pierig, Yan, war an tót Eur fent e gwelet penôs e oar stumman e goz diouz o hini. Ken e kred d'an nen bean eno o klevet hag o sellet!...

*Sant Nikolas hag an tri vugel* eo istor burzud sant Nikolas e kenver an tri vugel kristen lazet gant ar c'higer pagan. Diskleriet fréz ha war e bien, n'eus netra bravoc'h da c'hoari er patronajou.

## Breiziz Kadarn

*Paul Henry, ofiser war wor (1876-1900)*

Eiz de e chomas ar Bokserien da bourchas armou, hag e tiguejont neuze gant fuzuilhou ha pevarzek kanol Krupp. An iliz-veur elec'h ma oa ar gwrae a zo hepdale hanter diskaret war o c'hein.

P. Henry a wel an enebourien o charre eur c'hanol evit drailhañ an nor; ne sko ket fall an tennerien; ar vartoloded, avat, gant, o fuzuilhou, n'o lezont ket pell en o zav; souden ne chom den war an dachen nemet ar re varo. Mes n'e ket awalc'h, Paul a renk kemer ar c'hanol-ze. Digoret eo an nor; martoloded, er penn arôk, a denn ken e yud, evit sevel ar bec'h diwar an tregont kristen a ya d'ar red, gant kerden ha sparliou, da lakat seziz war ar c'hanol. Dont a ra gante, dre forz bout ha jach; setu hen o vont dreist d'an treujou. Ar c'habiten a zistro trezek ar Bokserien, lore'h ennan, hag a hij e dog 'n eur youc'hal a-bouez penn: « Frans hepred! »

Adalek an 23 betek fin ar miz e strak an tãn hag an tennou, koulz an noz 'vel an de, diavéz ha diabarz ar Pe-Tang.

Ar boed a vihana, ha, dre hira amzer, etouez kement a dud, ar c'hlenvejou en gôr a zo deut da gregi: ar wrech a zo staget war ar gwrae ha war ar vugale. Pemzek bemde a varv ganti; en diavéz, ar c'horfou maro a dôl eur c'houez ken pounner ma zo aon na zavfe ive ar vosen diwar gement a vreinadurez.

Ar Bokserien a zant eo arru fêz difennourien ar Pe-Tang; gwasaat a reont da dennan, da skei « fuzeennou » hag a lak an tãn en tier; daou-c'hant hanter-kant gwech eo red lazan an tãn er memez de; an tier zo hanter-dispennet gant an tennou; an O. Jarlin a zo tizet en e benn; an O. Favier hag ar c'habiten, a greiz kôzeal, e koue eur vouled e harz o zreid.

Dre zouar, e labour ive ar Bokserien: toullan reont punsou, garidennou da vont er Pe-Tang dre zindan ar voger. Ar gris-tenien a doull a-eneb hag awechou, pa 'n em gavont, e ve tennou ha lac'hadeg e kreiz tenvalijen ar punsou.

Benn ar fin, lod eus ar vager a zo distrujet. Ar c'habiten yaouank 'n eus ken a esperans: gwel e ra e heur divezan o tont hag e skriv e destamant d'e gerent.

*Ma c'herent muian-karet,*

*Ma ven lazet, al lizer-man a gaso d'ac'h ma divezan kenavo. Na gemeret ket re a drubuilh: mervel a ran vit ar vad ha goude bean grêt kement a dleen ober. D'ac'h e roan an nebeudig arc'hant am eus, 'met e choulennan ma vo kinniget 100 lur ane da vistonou ar Chin merzeriet ken kri er mare-man.*

*Ho priata ran a greiz ma c'halon, herve ar garante am eus bet evidoc'h a viskoaz. Kas a ran d'ac'h ma c'henavo diwean, ha d'hon c'herent ha d'hon hall vignoned...*

*C'hoaz eur wech, kenavo, kerent muian-karet. Pedet evi-don!*

*En hano an Tad, ar Mab, ar Spered-Santel.  
Evelse bezet gret!*

*Pe Tang, 18 a viz gouere 1900.*

An de arôk, an ofiser yaouank an evoa goulennet gant an O. Favier, en e hano hag en hano 24 martolod, Bretoned eveltan, ober eun naved d'an Itron Santez Anna, patronez Breiz.

Gouel Santez Anna a dremenas hep na deuas sikour ebet. « Marteze, eme an O. Favier, eo gwel gant Santez Anna lezel an enor gant he merc'h. Gouel Hanter-est a vo breman souden.

Gouel ar Werc'hez a zigasas gantan kelou a zilvidigez, mes 'benn neuze, Paul Henry a oa maro.

An 29 hag an 30, ar Bokserien a deuas evit skei an tôliou diwean. Nag ar fuzuil nag ar c'hanol ne dave etre o daouarn. P. Henry gant daou vartolod, Delmas ha Kallak, a oa pignet war eur chafod da harz an tãn d'al lojeiz ha da dennan war an enebourien. En berr amzer, Delmas an eus diskaret eiz warn ugent. — Bôn! Delmas, eme ar c'habiten. N'e ket peurlavaret ar gomz-ze m'eo tizet ar martolod en e wrech. Kallak a gemer e fuzuilh; pleged drek d'an tenner, Henry a zell, dre an toull buod, da gât an enebourien. Kerkent, Kallak a dap en e skoa eur vouled hag a ya ac'hane da skei an ofiser en e c'houg. O 'n em zantout gwall dizet, mont a ra heman 'vit disken: eur vouled-all a sko anean dreuz-da-dreuz... A-boan ma c'hall eur heleg rei d'ean an absolven diwean, maro eo.

Devez a c'halc'har! Devez a dristidigez! Tri mil kristen a gas korf an ofiser yaouank d'an douar hag a zoug d'ean kanvou vel d'o zad: laket eo en harz iliz an Itron-Varia Lourd.

Divezatoc'h, e relegou a zo bet digaset d'e vro. Emaent breman o repos war dosen Kergrist, aboue ar 26 a viz mezeven 1902. Eur menhir a zo bet savet d'o gwaskedi, eur groaz zo kizellet warnan, eun heor hag eur bod palmez, da zisklerian e oe ar Breizad Paul Henry, maro da 23 vla, eur c'hristen, eur zoudard hag eur merzer.

X...

# AN DISKAR-AMZER

Achu 'zo d'imp gant an hanv  
 Hag e wenedied skaav,  
 A dremen prim 'vel luc'hed  
 Dindan an oabl alaouret,  
 O teurel d'ar sklerijen  
 Joausted o skrijaden; —  
 Achu 'zo d'imp gant an hanv  
 Hag e wenedied skanv.

Skubet gant an avel garv.  
 Ar bokedo a zo marv;  
 Ar gwenan, kloz er rusken,  
 Zo morzet gant ar yenien,  
 O hunvreal d'ar prajo  
 Ha c'houez vad al lloz; —  
 Skubet gant an avel garv.  
 Ar bokedo a zo marv.

An evned, dindan ar glav,  
 A bleg o fenn hag a dav;  
 O na pell ec'h oc'h, siouaz,  
 Nejo flour hag no glaz!  
 Perak badet ket bepred,  
 Karante, evurusted? —  
 An evned dindan ar glav  
 A bleg o fenn hag a dav.

Ar gwe, oa kaerder miz mae,  
 Zo diframmet d'e o zae,  
 Ha skrapet gant an avel  
 O c'hurunen, o mantel,

'Vel eur paourkez tremener  
 Laket e noaz gant eul laer...  
 Ar gwe, oa kaerder miz mae,  
 Zo diframmet d'e o zae.

An den, ive, zo henvel  
 Ouz gwe tourtet en avel:  
 E yaouankiz, e c'hened  
 A goll, neubed ha neubed,  
 Vel 'lez an oanedigo  
 O gloan a-dreuz d'al laono; —  
 An den, er bed, zo henvel  
 Ouz gwe tourtet en avel.

Goude hanv, an amzer gri,  
 Goude yaouankiz, kozni;  
 Ha ni neuze d'hunvreal  
 Er pez a garemp gwechall:  
 Nerz, plijadur ha yec'hed,  
 Touez ar bed hag e gaerded; —  
 Goude hanv, an amzer gri,  
 Goude yaouankiz, kozni.

Pep tra er bed a dremen  
 Ha pep tra 'n eus e dermen:  
 D'an douar 'koue an nejo  
 Ha krazan ra ar bleunio;  
 Eun tamm poultr, ha netra ken.  
 A vano warlerc'h an den; —  
 Pep tra, er bed, a dremen,  
 Ha pep tra 'n eus e dermen.

GAB LISKILDREY.

## Cennad Catholig Cymru

Kerdu, genver, c'houevrer. Kelaouen savet gant an T. Trebaol  
 evit dizrei warzu ar fe gatolik protestanted Bro-Gymru.  
 1 skoed ar bla.

32 pajen ar miz; — skeudennet kaer. Hen goulenn gant:  
 The Rev. G.-M. Trebaol, O. M. J. Catholig Church, Llanrwst,  
 Wales.

# MA BINIOU !

1.  
 Me eo Yann an ebad  
 Anavet dre ar vro  
 Ouz trouz e votou koat  
 Hag e sach' binio. (bis.)

DISKAN  
 O youp, youp, ge masuret,  
 Di gue dig lan lei!  
 O youp, youp, ge masuret,  
 Di gue dig lan la!

2.  
 Ma c'harg a zo uhel,  
 Daoust ma seblant dister;  
 War douar Breiz Izel,  
 N'eus ket gwelloc'h micher!

3.  
 Evi l'ar gwall-amzer,  
 Me 'n em gav en pep lec'h,  
 Ha pa wel ma zac'h ler,  
 Ar velkoni a dec'h...

4.  
 Enebour an anken,  
 Bourev an nee'hamant,  
 Karet on el loeben  
 Vel er palez arc'hant.

5.  
 « Setu Yann an ebad,  
 « Digoromp ha raktal;  
 « Vit eur banac'h jistr mad,  
 « Hen a rei d'imp tridal. »

6.  
 En ebad, en dansou,  
 Me ve er penn kentan ;  
 Heb-on e ve kanyou  
 En eurejou kaeran !

7.  
 O son eur jabadao  
 Ma zad a oa maro,  
 Me renk bean war zao,  
 Pa dosto an Ankou.

8.  
 Ha pa vo 'us d'am fenn  
 Gwintret e falc'h digar,  
 Primoc'h evit eun tenn,  
 Me lampo en e garr...

9.  
 Ma baz war ar marc'h koz,  
 Ha dao gant an henchou,  
 Trezek ar Baradoz,  
 Ouz sòn ma biniou..

10  
 « Dek eur eo, 'me zant Per,  
 « Setu trèn Breiz-Izel;

« Anavout a ran skler  
 • Mouez sklintin e c'houitel.

11.  
 Neuze krogo ar varn,  
 Hep mar, kri ha garo,  
 Me stouvo ma dioukouarn  
 Hag em zac'h a c'houeo.

12.  
 O klevet ton breizad  
 Er bed-all o tistôn,  
 Sent ma bro, leun a stad,  
 A bedo evidon.

13.  
 — Deut neuze, 'me Jezus,  
 Kemeret eur gador,  
 Start e kavan reüs  
 Sonerien an Arvor...!

*O youp, youp, ge maluret,  
 Di que dig tran leit!  
 O youp, youp, ge maluret  
 Di que dig tran la !*

KOULMIG ARVOR

Pa ve arru an est,  
 C'ha ar mevel da vestr,  
 Pa ve arru miz here,  
 C'ha da vevel adarre.  
 Gwell eo ober labour fall  
 Eget dizenti ouz ar mestr.  
 Yod en gô  
 Ha bleud da lakat,  
 Yod poaz ha yod da boac'hat,  
 An hini goz, gant ar gloge,  
 O c'houl : Ha yod a vank aze ?  
 Raz-a-raz,  
 Vel pater ar c'haz.  
 Tevel  
 Eo ar gwellan mevel.  
 Vel eur c'hi plom.  
 Lec'h e koue, e chom.  
 Aret a-dreuz, aret a-hed,  
 Mar peus temz, ho po ed.  
 Azen gorniek figezen.  
 Dioukouarn hirr ha loriken,  
 Man ar vaz drek an nor,  
 C'hortoz an azen d'ar skol.

## MADALEN TRUBUILHET I

Gant ar winojen voan a gas a-dreuz parkou  
 Betek he c'hêrig koant kuzet 'barz ar rozion,  
 Madalen diarc'hen, he gwel war lein he zal,  
 A gerze gorregik, he spered o sonjal.  
 Bremaik, er gêr vras, en Templ, he deus gwelet  
 Eun den burzudus kaer : Jezus a ve hanvet.  
 D'e gomz, an den seizet a zave pare mad ;  
 Gant eur zin, d'an den dall e rente daoulagad ;  
 Ha yec'hed, bue, nerz, a skuilhe d'ar c'hlanvan :  
 Pep reuz ha pep glac'har a dec'he dirakan.  
 Sellou gwerc'h e lagad, e gomzou kalonus,  
 Oa enne eun douster, eur glanded dudius,  
 Ma teue an holl bobl, zoken ar vugale,  
 D'hen klevout o kuzuilh e lezennou neve.

'N he c'halon, Madalen 'zo gwasket, strafilhet :  
 E zellou gant he re, bremaik 'zo 'n em gavet,  
 Pa oa hi aketus o selaou e lezen.  
 Evel eur men stlapet en deun gwag eur feunteun,  
 A lak an dour en berv hag ar pri da veskan,  
 Lagad sklêr « den an Templ » an eus, en eur baran,  
 Treuzet hec'h ine hi he skuilhet an drubuilh  
 'N he spered, 'n he c'halon, a oa er fank o ruilh ;  
 (Rak Madalen 'deuz grêt epad he yaouankis  
 'Met zôtran he c'hened, he friellan iskis !)  
 Oh ! sellou an den-ze, oh ! nag o deus flemmet,  
 Nag o deus tizet don hec'h ine kailharet !..  
 P'o deus paret warni, he dije karet kuz,  
 Mes o glanded ken splan a zo flour ha stagus...  
 Ha Madalen, 'n eur vont a-hed er winojen,  
 A zonz, a zonz bepred en zellou glan an Deu ....

An evned er girzier a gan soniou seder ;  
An heol a guz er mor 'n eur zistan e domder :  
Kaerder ar pardeiz-noz a zo fresk ha dispar.  
Mes en kalon ar plac'h e tihun eur glac'har ;  
Eur vouez 'n he c'hreiz gwasket a glem, a ouel ziuolik  
Hag a lar truezus : « Petra 'teus grêt, merc'hik ? »  
Madalen 'zo mantret ! 'N he c'hoaze er yeot glas,  
He fenn 'tre he daouarn, e van da zonzal c'hoaz ;  
Ha bepred e klev mad, aze en he bruched,  
Da bep storlok he gwad, ar rebech ken kalet :  
« Petra 'teus grêt, merc'hik, en az pue heuzus ?  
Da c'hened, da c'hlanded, gwallet, sôtret spontus !! »

Ha dre ma klemm ar vouez, Madalen trubuilhet  
A zant o tigeri he c'halon ken mac'het.  
Eur voren deo a deu da vongan d'ei he gwell,  
Mes bepred diraki eur skeuden a luskel  
Dalc'hus 'vel eun tamall, ha tener koulskoude,  
Skeuden « den an Templ » gant e zell leun a drue.  
A greiz oll, an daero, daero dru ha bervet,  
A gouez zioul war barlen ar plac'h paour glac'haret.  
Trec'het eo he c'halon : « Siwaz d'in ! Me oa dall !  
Me oa kollet ! emei, diskaret gant ar fall !  
Ah ! me a gave d'in 'oa man drek ar bed-man ;  
Ne zonzjen ket, paour kez, 'vije stlapet en tan  
Ar wezen dizec'het a ruilh war an douar.....  
Na me ken brein a ruilh, ha pell 'zo, oh ! glac'har !! »  
Ha Madalen a ouel, hag he hirvoud mantrus  
A ziston er zaonen 'n eun hekleo ken pòanius,  
A sko 'kreiz ar pardeiz eun anken ken kalet  
Ma tav en o zoniou an evned sebezet.  
Eus lein ar meneiou, an noz sioul a zisken ;  
Al loar a zav gorrek gant he lugern melen,  
Hag en nenv, ar stered a zigor o lagad,  
'N eur vouse'hoarzin d'an heol a ruzia o kuitât...  
Hag ar plac'h he-unan, gant hec'h enkrez c'houero,  
He-unan er roziou, a ouel, a skuilh daero.....  
Ah ! breman oar ervad perak sellou Jezus,  
Pa oant stignet warni, 'oa ken melkonius :

Betek deun he c'halon e furchent pep bolzen,  
'Vel eur bann-heol er c'hoat a furch en peb boden.  
Oh ! kri o doa kavet stad direiz hec'h ine,  
Pa deuas, war o douster, eur voren a drue.....  
Mes Jezuz, marteze, gant e c'halloud ken braz,  
Ouz he c'halon frailhet an evo true c'hoaz !  
Marteze, vel ma lar, ec'h eo kannad Doue  
Diskennet er bed-man gant eul lezen neve ?  
Oh ! neuze e c'halife, gant eur gomzik hepken,  
Renti d'hec'h ine paour e c'hlanded gwerc'h ha gwenn...  
Ar glanded-se biken nan anveo kailhar,  
Na pa de 'n he bue pep maro, pep glac'har.

En spered Madalen digor d'an dizesper,  
Ar zonz-se a luc'has 'vel eur sklerder dener.  
Raktal e sav 'n he zav dazorc'het, kennerzet ;  
War he dremm bremaik ken poaniet, ken krizet,  
Douster, peuc'h eur spi grenv a lufr flour ha skedus.  
He bleo du dispaket gant an avel jòanis  
'N eur ziruilh war he zal a zizec'h he daero.....  
— Ya ! 'mei, mont a rin ! Jezuz am fardono ! ! »

ROC'HLANN.



## BUE AR VREURIEZ

EUL LIZER.

— « Hirie, eme eur vestrez skol gristen-ha n'oufemp trawalc'h he zrugarekât, — e kasan d'ac'h vit *Arvorig* hano eur plac'hig seiz vla hag a lenn brao ar brezoneg hag a zo o vont da zeski skrivan anean.

Gwelet a rei, ober a ran brezel d'al lod, d'ar madigou ! Ze a desk d'ar vugale 'n em drec'hi hag ober impli vad gant o arc'hant.

Er skol-man, zo breman 65 plac'hig en Breuriez ar Brezoneg ; er skol pôtred, e kichen, zo 46 !

KANT UNNEK bugel ! Talvezout a ra ar boan strapan an daouarn d'eur barouz evelse. Gwir eo, hounnez eo PLLIDI, a-viskoaz parouz ar Brezoneg !

## ARGOAD-ARVOR

Eur skol vrezonek a zo neve savet en Pariz dindan paeroniez an O. Adrien de Carne. Le « Breton en 40 leçons » levr an O. Vallee, rener *Kroaz ar Vretoned*, a vo studiet eno. Kalz a skolarien d'ar skol neve !

— *Kelc'h Sant Eriean Sant-Denez* a gerz bepred gwelloc'h gwell : c'hoariet e ve ennan alies peziou brezonek ha bet eo e c'hoarierien en kêr Bariz en Santez Anna an Ti-gwena, o rei eur gouel da Vretoned ar c'harter-ze Konfortus eo gwelet seurt labour. Doue d'hen binnigo bepred !

— En Sant-Malo zo savet eur strollad Bretoned da c'hoari peziou brezonek Hon mignon eus Sant-Jili, *Yan Porz-Pin*, a zo er penn ane. C'hoariet o deus *Ar Mael laer* ha jachet eleiz a dud da welet ane. Hon gourc'hennennou ar gwella d'ar botred Kalonek-man.

## LEVRIOU NEVE

NOZ NEDELEG. — Mister breton en I arvest, evit ar merc'hed yaouank, gant an O. Adrien de Carne (Barz an Arvor).

Ar pez neve-man zo diskleriet ennan ur buzzud grêt gant ar Werc'hez, noz Nedeleg, e kenver eur plac'hig dall. Ar pez a zo diouz merc'hedigou, savet ispisial evite An O. de Carne a skriv d'imp evellen, da heul e bez.

« Setu aman a livirin d'oc'h e kenver ar pezig-se :

Ar mestrezed-skol eus hor Breiz, ma tenfe gant unan bennak anezo souj da lakaat c'hoari *Noz Nedeleg*, ar re-ze n'o dije ken da ober nemet goulen diganen kement eus al leoriouigou-ze ha ma plije d'ezo.

Ha raktal e kasin dek, daouzek, penzek anezo *evit bennoz Doue ha netra ken* »

Trugare d'an O. A. de Carne, d'ar vadelez an eus da rei d'ar skolaerezed kristen digare da c'hoari peziou kaer en brezoneg.

An O. de Carne a zo o chom : *Villa d'Arvor*, Bourg-la-Reine, Seine.

Sant-Brieg. — Ti Moulerez Sant Gwilherm, 27, Bali Charner.

An *Kevsaer* : F. EVEN.

## Gouelioù brezonek Gwengamp

an 8, 9 ha 10 a viz gwengolo 1914

savet gant Bleun-Brug Leon ha Breuriez ar Brezoneg Treger dindan paeroniez uhel an Otrou MORELLE, eskob Sant-Brieg ha Landreger.

### I. Paeroned ar gouel

'VIT TREGER :

An O. 'n abad Pennec, vikel-vras ; an O. 'n abad Gô, vikel-vras a enor, person Gwengamp ; an O. 'n abad Thoz, chaloni, person Lannou ; an O. 'n abad Ollivier, chaloni, person Boulvriak ; an O. 'n abad Guyomard, chaloni, rener kolaj an Itron-Varia, Gwengamp ; an O. Keranfle'h, senedour ; an O. Huon a Benanster ; an O. Billot, m'ér Gwengamp ; an O. Martin, medisin en Gwengamp ; an O. Hernot, kizeller, Lannou.

'VIT LEON :

An O. de Mun, depute ; an O. Kermenguy, rener ar *Bleun-Brug* ; an O. 'n abad Treussier, chaloni, person Kastel-Pol ; an O. 'n abad Colin, chaloni, person Sant-Thegonnek ; an O. de Guébriant, m'ér Kastel-Pol ; an O. Soubigou, depute ; an O. Pouliquen, m'ér St-Thegonnek ; an O. Lareur, m'ér Plouzane.

### II. Strollad labour

SAVET EN GWENGAMP :

Renner : An O. Emile Neumager ; eil rener : an O. 'n abad Le Clerc ; tensorer : an O. Stéphan, noter ; sekretour : an O. Guépin, kuzuilher kêr.

### III. Roll ar gouelioù

*Ar meuz* 8 a viz gwengolo, adalek 3 heur. — Lennadeg labourion war an ezom a zo da zeski ar galleg d'ar vugale dre ar brezoneg.

*Ar merc'her* 9, da 9 heur. — Lennadeg ha skrivadeg bugale *Breuriez ar Brezoneg*.

Da 2 heur. — Peziou-c'hoari gant ar vugale.

Da 8 h. 1/2. — Pez-c'hoari 'vit micherourien kêr, gant c'hoarierien Bro-Leon.

*Ar yaou* 10, da 8 h. 1/2. — Oferen en iliz-veur.

Da 9 h. 1/2. — Kanadeg vras etre kanerien a Leon, a Gerne hag a Dreger.

Da 12 heur. — Banvez.

Da 2 heur. — Peziou-c'hoari gant c'hoarierien ar Bleun-Brug ha prijou.

Da 5 heur. — Salut ar Zakramant.

Ar miz a deu vo laket war *Arvorig* ar prijou, da c'hounit kinniget d'ar vugale gant *Breuriez ar Brezoneg*, ha d'ar ganerien gant ar *Bleun-brug*.

Ar miz a deu ive *Arvorig* a vo laket warni petra 'n evo ar vugale da zeski vit kât lod er gouelioù.

Adalek breman, lavaromp n'ezo peurz er prijou nemet ar re a onto dija lenn ervad ar brezoneg.

# EBREL

*Mont a reont, ar paourkez tud,  
En eur lenca, d'o foaniou yud ;  
Ebrel a c'hoarz dindan ar glao,  
Oc'h ôzi d'è an amzer trao.*

*Bemdez ec'h a dre ar c'hoajou  
Da skignan had ar bokedou,  
En eur c'hucitellât d'ar mouilc'hi  
Soniou nere leun a zudi.*

*Pa gousk an holl, klos o lagad,  
Hen, da care'heidigou ar prad,  
A gizell boutanou melen  
Hag a zisten kollierou gwen.*

*Pa gousk an holl, o lagad klos,  
Hen a las ar mabigou roz  
En o forpannig boulouz gwer,  
Tro al liorz, hep laret ger.*

*Lakât a ra eur c'habel gwen  
Dreist d'ar gwe 'man disto o fen,  
Asten a ra eur vantel c'hlas  
Dreist d'ar parkeier zo e noaz.*

*Pa labour, labourat a ra,  
Ha p'en neus renket mat pep tra,  
E kinnig e zorn d'ar miz Mè.  
Hag e lar d'han : Ma breur, deus tre.*

MELIAP.

7 a viz Ebrel 1914.

## « Tud ha treo ar vro »

Gant kalz a blijadur — n'oufen laret pegement, — e heuilhan hag ez on a galon gant ar skrivagnerien vad, *Eur Mignon* ha *Loëz Porz-Ihel*, a gelen, gant kement a nerz hag a ouiziegez, ar yugale war « Dud ha treo ar vro ».

« Tud ha treo ar vro » a zo hirie re dilezet, siouaz ! Mont a reomp holl, evel p'hon dije piz kraz en eun tu bennak, da glask elec'h-all, a nebeudigou, an evurusted, ar vadelez, ar frealzidigez, zoken, a gavomp, a vern, endro d'imp.

Eur vez, eur vez ru eo ! Seblantout a reomp laret d'an estren n'ez eus nemed paourente en hon Breiz ha, koulskoude, mar kemerfemp ar boan da zellet hepken a-hed töl d'imp, e chomfemp souezet o welet nag a gaerderiou a zizolofemp.

Ne gomzan ket breman eus koantiri hon maeziou, a zo dispar, evel ma oar pep hini, ha ken dishenvel, war ar vad, diouz koantiri broiou-all, brudet kaer koulskoude ; komz a ran hepken eus koantiri guzet hon c'hornig-douar, pe, gentoc'h, eus e gaerderiou tremenet, war bere e tlefemp skoneria hon bue, pegwir an amzer goz a zo leun-chouk a gelennadurez ha pegwire renkomp, zav-töl hag en despet d'imp, kemer kentel warni.

Daoust ha æ vefe ket evurusoc'h hon bugale, lorc'husoc'h hon zud yaouank ha sederoc'h hon zud koz, mar anavefent holl ar pez a zo bet tremenet gwechall en Breiz, petra laran ? ar pez a zo bet tremenet en o favouzig ?

Histor hon Bro disket ha studiet dre zouar pep parouz, a zo eur vengleuz souezus, a c'hoantafe pep hini toulla donoc'h-don, a-boan ma ve tennet ar men kentan anezi. Nag a dreo, nag a danevell, chadennet an eil ouz an all, hag a lak da lintra ken skedus, a-wechou, spered eun amzer, disprizet ganimp alies abalamour n'hon deus biskoaz kemeret ar boan d'è studia a-dreuz hon skiant-vad ha nan ebarz eur rum levriou a guz diouimp ar wirione, gant aon da varn an amzer a vremen... ya, nag a dreo sklerijennus ha leun a gelennadurez na diskfemp ket ebars histor hon farouziou !

Pec'hed eo, ha pec'hed marvel, lezel ar pinvidigeziou-ze en argoll ; rak gallout a rafe digouezout eun amzer — Doue da viro ! — ha ne c'hallfer mui o implia : an dud, boazet a dreo-all, treo dihoell, n'o c'harfent ken. Awechou, ho pet sonj, e c'hoarve gant ar spered evel gant ar c'horf : heman, kastizet gand ar c'hlenved, a heug dirak ar boued nerzuz, hag ar spered, maget gant gevier, n' hall na digemer na gouzanv ar wirione. Diwallomp ervad da goueza er pâl-ze : hennez a vefe hon Ankon !

Ha piou a sklerijenno ar yugale war « dud ha treo ar vro » ?

Ni, barzed, beleien, skrivagnerien.  
 Piou a raio ahendall ? Mezus eo sonjal pegen dizisk eman hon c'henvroiz hirie war gement a dlefent gouzout da genten ! Evit gwir, en diavez d'imp, o deus ive nebeut a vestrou d'o c'helen...

Ar vistri-skol, re ar Gouarnamant, a zo a eneb, al loden vrasan ané, da vihanan. Evite, ne oa nemed tenvalijen, kabestr, hual ha sklavaj arók an Dispac'h vraz. Paourkez tud berr-welet ! Bet o deus digant o skoliou eur spered a gasoni ha n'hallont mui tridal gant an disteran mennoz kaer. Eur voger teo, ledan hag uhel a harz ané da zellet en tu-all d'ar blavez 1789. Henez eo an dremwell ; en tu-all eo noz, noz-du evité.

Ha gante, koulskoude, herve o c'hlevet, eman an holl sklerijen hag an holl skianchou !

A-beurz ar vistri-skol eta, netra da c'hortoz.

Hogen, nag ar Vretoned nag o bugale — ar re-man nebeutoc'h c'hoaz, — n'hallont chom dall pik war o gouenn, war o Bro, war o galvedigez.

D'imp neuze d'o sklerijenni.

Ha dao d'al labour dustu !... Ha krogomp ennan gant kalon !... Ha dalc'homp gantan hep digennerzi !

Perak, m'hen goulén diganec'h, lennerien garet, e tiskfe ar vugale ped roue a zo bet en Bro-C'hall, ped brezel, ha na diskfent ket hano an Duked vad a stourmas evit frankiz Breiz, hano ar zent koz, deut a Vreiz-Veur, a zigasas d'imp sklerijen ar fe hag eo ken burzudus o bue penn-da-benn, hano an dudze a skuilhas, enpad an Dispac'h, o gwad taken ha taken evit o c'hredennou, evit douar o c'havel, evit o frankiz, — ya, evit o frankiz da viret, da vihanan, o Breiz gant he rann-vroioù hag hec'h Eskoptiou koz, rann-vroioù hag Eskoptiou a harze anei welloc'h da vezan dispennet ha, koulz laret, euret tam ha tam gant ar Vro a ro d'ei breinadur ha loustoni evit he glanded hag he furnez ?

Mad eo diski histor Bro-C'hall, gwelloc'h eo diski hini Breiz. Mar renkan dibab, me yelo seder da hini ma Bro garet.

Ar furnez a laro d'imp diski ané o-diou.

Roet neuze ar renk kentan da hini Breiz !

AR YEODET.

## FOAR AR GODELLOU TOULL

(*Yez Leon*)



ioc'h an abardaez, setu Fanch koz o tont d'am c'haout :

— Gouzout a rit, aotrou, emezan, em beus divizet tri devez foar ; vare'hoaz, ma n'ho peus ket ezom ac'hanon, em beus sonj da vont da Landi.

— Mat, mat, yao, eme ; eus gouloudeiz betek nav heur eman ho kabestr war ho mouë... Setu aman gwerz eur banne hag eun tam butun...

Hag e rojon d'ezan eur pez dek gweneg Fanch koz a dennas e voned segovi

hag a bokas d'e zourn. En nozvez-ze, ar zaout, ar marc'h o deve askoan, ken laouen oa ar mevel.

Antronez, mintin mat, edo Fanch koz oc'h en em frotta, oc'h en em spura, oc'h en em larda (da lavaret eo, o larda e voutou) ; e varo a yoe raklet, e vleo griz difuilhet, diboultrennet... M'en dije gellet ive o diloueda !... Mes siouaz ! ouzomp-ni, braerrien koz, e well stag ar c'hanastr !

Wardro seiz heur ez eas d'e yalc'hig, e kemeras eur pez ugent real, e sellas piz outan, rak marteze her gwele evit ar wech diveza... Unan koant oa, kochet tro-war-dro. Eur pez a eiz real digoch a deuas warlerc'h, ha da echui, eur gweneg bennak. Evel just, ma fez dek gweneg a oa ive eus an abaden.

Goude-ze, Fanch a zoubennas, hag e jiletan vanhek dindan e gazel, e gorn en e veg, en em lakeas da dreuzi ar boork ken drant ha pôtr yaouank ebet.

— Ata, Fanch, a lavare an dud, mont a reer 'ta ?

— Ya ! ya ! eme Fanch.

— Ata, Fanch, eme re-all, n'oar ket korbezen hizio ?

— Tra ! tra ! eme Fanch.

— Petra, Fanch, eme eur miliner a oa o karga daou pe dri leue, ne vezo ket eur banne... eun tammig sao ?

Fanch a zellas a-dreuz ouz va fenestr, rak gouzout e rea ne garan ket kalz ar zaoioù. Kloz oa pep tra. Setu Fanch en hospitaliri, hag ac'hane e karr ar miliner. Ma savas marvailhou, n'eus ket ezom d'hel lavaret ; ar vilinerien a zo touchennet mat o zeod, ha farouel Fanch, goude eul lipaden, a yea ive kempen endro.

O c'hoarvezout e Landi, e tiskennas ar miliner hag e amezeg ; an daou leue ive a deuas erméz war bouez o divesker. Ar miliner a renke paea ar gwir evit an daou leue, ha Fanch, pôtr brao, na petra 'ta, a bacas adarre ar gwin d'ar miliner.

Setu Fanch e kêr. Evit gouzout an heur, e sellas ouz horo-



lach an iliz ; hogen ne ouie ket kalz dioc'h an traou-ze ; an nadoz hirra a oa war bemp, ar verra eun tammik e tu-all da nao.

— Satordallik ! eme Fanch, setu aze diou nadozen ha n'int ket evit en em glevet ! Ma vijen-me horolacher, ne vije nemet eun nadozen war ar rond gwenn-ze, ha neuze an holl a welje sklér an heur. An heol, setu eno eun horolach !... Nadozen ebet warni !... Setu eno eun dra grêt diouz ar baizanted !... Bah ! bah ! eme Fanch, o vont larkoc'h, nao heur eo, en gros, perak chipotal ?

Petra reer en eur foar, pa ne vez netra da ober ? Evidoun-me n'her gouzoun ket ; Fanch, avat, her gouie.

Da genta, ez eas da dachen ar moc'h hag e varnas peb unan hervez e vent hag e gig. Goude-ze, da dachen ar zaout ; goude-ze da dachen ar c'hezek. Edo eno, pa zonas an Anjelus. Fanch a oa kristen mat, a dennas e zegovi hag a ziskouezas e vleo gris adarre eun nebeut poultrennet.

— Eun tam boued brema ! eme Fanch. Hag ez eas warzu eun hostaliri. Edo o kompren ennan e-unan an dispign a dlie da ober : daou wennegad souben, tri wennegad kig, pevar wennegad gwin hag....

Fanch a lakea e zourn en e c'hodel zeou ; eno e kave d'ezan beza laket hag ar pezh kochet hag an hini digoch, hag ar reall.... Siouaz ! siouaz ! netra ebet er c'hodel. Goude-ze ez eas d'an hini gleiz. Siouaz ! siouaz ! Kant gwech siouaz ! goull o ! toull o ! daou viz Fanch a deue erméz.... E arc'hant paour a oa ét kuit, koch digoch, dre ar memes hent.

(D'achui eur wech-all).

Ar gontaden dudius-man a zo tennet diouz levr neve Klaoda Prat, mestr-akol kristen e Landivisio. Al levr-man *Marvailhou neve*, a ve gwerzet e ti an oberour, 3 f. 20 ar pezh, kuit a fréjou kas. Moullet kempenn eo ha skeudennet eus ar c'haeran.

Eun nebeut girou eus yez Leon a lakomp aman, re diés da intent.

*Brasrien*, en galleg, broyeurs (de lin).

*Kanastr*, ar pezh a hanver *arvach* en Treger, tammou lin drailhet gant ar vrê.

*Bezan korbezen*, bezan rasket, en Treger.

## FEIZ HA BREIZ

Setu petra a gaver en miz ebrel eo *Feiz ha Breiz*, kelaouen Kemper, renet gant an Aotrou Perrot, kure Sant-Thegonnek, sekretour ar *Bleun-Brug*, a deuo ar bla-man da Wengamp, da viz gwengolo, d'ober eur gouel bras en brezoneg, a-unan gant *Brewreiz ar Brezoneg*.

Jezuz-Krist hag ar bobl (A. R.) ; — Charlez Kornik, den a vor (L. Ar Gwennec, J.-M. Perrot) ; — Kimiad an Aotrou Perrot ; — Ar Revolution (I. U.) ; — Au pays du Cap (L. et B.) ; — Kuzulioù (Ar Medisin) ; — Ar Valvennig-Wenn (Bleiz Novet) ; — Nos Concours de musique (le Comité) ; — Paner ar marvailhou (Klaoda Prat) ; — Ar Groaz-Wenn (X...) Keleier ar miz (le Paysan) ; — Divinadennou (Pêr ha Pol),

## Ar c'havrig torret he c'horden ganti

Gwennig a c'hoarze dindan he c'hronj. An nor a oa serret, gwir e oa ; ar prenestr, avat, ne oa ket. Hag a-boan ma oe troet e gein ganti Yan bleup, e pigne ar c'havr war ar preseb, ha youp ! eul lamm, eur zailh, eur zell-tro, ha d'ar red trezek ar mene ! Diwisket oa ganti he c'horden, 'benn ar fin !

\*\*\*

Chékon ! Nag a c'houez vad ! Pa difretas Gwennig er mene, oe grêt gouel-berz d'ar Brinsez yaouank ; biskoaz kaeroc'h pardon n'he devoa gwelet. Ar burlo oa digor hag a vralle eviti o c'hleierigou ; ar balan ive, hag ar bleun bara-aman, hag ar brug, hag al lostigoù, kelve ; hag ar spern-gwenn a sparfe ezans gwasan m'helle... Ar c'havrig oa dare da zemplan ganti ar joa.

Nag ar yeoten eta, ma zud kéz ! Alaouret, dantelezet ha flour, ha ganti c'houez ar frankiz ! Da gentan, Gwennig a falc'he dioutan leiz he genou, en eur zailhat du-man, du-hont ; mes kement e oa, ha ken saourus, ken ne ouie kaer pelec'h skei ; soubet e oa ebarz, evel 'kreiz eur parkad gwiniz, da Ouel ar Werc'hez !


Pa oe leun kof, e oe grêt eur valeaden. Kement gavr a zo, ve ordinal stag ouz he zreid eur botou-lêr neve, botou-lêr skanv, pet sonj ! Gwennig a oa skanvoc'h c'hoaz he re. Hag e teuas en he fenn eur zonz iski : « Daouste, emei, betek pelec'h e tap ma Rouantelez ! Deomp da welet ! »

Breman, bugaligou, pa ve krog eur c'havr da frinkal, n'e ket brao mont da heul, sur ! Houman oa zodet net ; ha da drupal, ha da grapat, ha da risklan, ha da ruilhal a-glei, a-zeou, 'beg ar roc'h, deun an draouien.... Arsa, touet en dije an den e oa kant gavrig ebarz ar mene !

A greiz tout, e chome en he zav, penfollet ganti ar blijadur, he zam kalon o skei tóliou stank, he c'herniou sac'het etre eur bern bleuniou, bleud melen ar yeot kraz o tarnijal endro d'he fri, hag a greiz tout adarre, youp ! ha war 'rök, plegat he fenn ganti, pe he c'herniou a-bik en avel ! Ah ! me lar d'ac'h, ne oa ket brao d'ar blei en em stokan ouz seurt diaoulez ! « Ar blei ? peuh !... Me garje awale'h hen kat dirakon. Eun töl korn, ha

setu diroget e chupen ! Kaeran tro-dans a rajemp hon daou ! »

Pa oa o kantreal e giz-ze, ken skanv ha tra, setu hi o tifoupan war glipen uhellan ar mene. Gwintret ken dispar, e wele diraki eur blenen vras, ha du-ze, set, du-ze pell-pell, lochen Lommig gant al liorz dreki ; hag al lochen a oa ken bihan, ken bihan, ken e tirollas Gwennig da c'hoarzin gant ar fent hag an drue !



Koulskoude, an heol a ziskenne lezourek ; prestik, en dije zerret an de e lagad tan ; freskoc'h e save an avel ; ar burlu e krene breman ar c'hleierigou warne ; brisât rê ar spern-gwenn ; ar balan a gloze e glorennou, ar brug e trouklive e jodigou ru hag an dervennou bras a hirvoude. A bep lec'h, evel eur mouskan, e teue da Wennig kant ali fur : « Kê d'ar gêr ! N'eo ket brao chom, en noz, da gousket er mene ! Kê d'ar gêr ! »

Ha just awalc'h, eur c'horn-boud a zonas, pell pell du-ze, d'an traou... Boo ! boo ! Korn-boud Lommig... Boo ! boo !... Gwennig a gave d'ei e lare : « Boo ! deus endro, divroet ! deus endro ! Aman e kavi kraou kled mad. Boo !... deus endro, penn-skanv ! Boo !... deus endro, paour kêz dianket ! »

Ar c'horn-boud a voude truezus. Ar c'havrig a oa teneraet ;

ne gave ken ar memes blaz gant ar mene ; en he c'hreiz, e oa eun dra bennak o sòn kanvou. Ar gever, bugaligou, a zo gwididik meurbed ; ne gollont ket en eun de an anaoudegez vad ; ha Gwennig a oa an dour en he daoulagad pa gleve ar paour kèz Lommig o sòn, o sòn, o c'hervel, o c'hervel, kuit da skwizan... — Penôs ober ? eme ar c'havrig ; pe mont pe chom ? Tòl fin, e teuas da zonzj d'ei eus ar gorden, ar peul, ar harz endro d'al liorz, hag e laras : « Bah ! aman e chomin ! Kenavo, Lommig, re e plij d'in ma frankiz ! »

Ne zone ken ar c'horn-boud ; an heol a zo kuzet ; ar mene a ra eun hurusaden ; an avel, breman, eo rust e alan. Hou ! Hou ! Setu eur youc'h a-dreuz ar mene, youc'h eul loen goue, sur mad... Hou ! Hou ! Yudaden skiltr ha garo, ken e spont ar balan, ken e chom ar burlu da chilaou.... Hou ! Hou ! Tostât'ra ar yudaden, ha Gwennig a zo krog da grenan, evel skornet en he flas.

Dreki, an deliou a hijas, ar brankou a strakas... Ha da zistrei, spouronnet : diou c'hlaouen dan, diou skouarnig soun ha lemm eyel diou gontel ; izelloc'h, eur rastel dent hirr hag wenn, a dremen warne, gwech ha gwechall, eun teod ru-gwadek : « AR BLEI !... »

— « Ya, Gwennig, me eo, ha naon d'in ! Mes tam prez ebet n'en eus warnon ! Te zo d'in evel ar c'houec'h-all ! Ya, greomp anaoudegez an eil gant egile ! Sell pegen brao e skrignan ma dent ! Pegen sec'h eo skubet ar rastel gant ma zeod !

Ha te ken koant ! Nan, biskoaz d'am c'hoan flouroc'h tam kig n'em o bet ! »

Azeet war grap e rër, ar blei a c'hoarze gwap, en eur danva, taken ha taken, nec'hamant Gwennig paour.

— « C'hanta, eme houman, betek p'eo red mervel, me varvo evel zo dleet ! » Ar blei a reas eul lamm ; ar c'herniou munut a grogas da c'hoari. Tol dant ha tol korn, an eil warlerc'h egile, ken e renkas ar blei, berr war e alan, souz a-drenv meur a wech. Ar c'hrogad a oe tenn ; ne oa ket da laret nan, ar c'havrig ne werzje ket he c'hroc'hen marc'hadmat !

Nemet sellet e ré awechou ouz an oabl, da c'hout hag èt vije ar stered war o c'hoste : « Oh ! emei, ran forz, gant ma c'hallin, evel Rouzig, derc'hel penn betek ar beure ! »

Ha betek ar beure e talc'has penn. Pa deuzas ar steredennou en env, Gwennig a laras : « Benn ar fin ! »

Hag en em ledas war he c'hoste, fêz maro, gant he chupen herminig mastaret a darchadennou gwad... Kerkent ar blei a zailhas warni hag he debras !...

Glevet ket, bugaligou ? Ar blei a zailhas warni hag he debras !... Pa grogo ennoc'h c'hoant ar mene, ar zorc'hen da derri ho korden, dalc'het sonj ; n'e ket traou gaer tout a zo du-hont...

Ar blei a zailhas warni hag he debras !  
Paour kez Gwennig !

## Ma Kulpa... dre ma fot ! dre ma fot !

Eun neventi bras a zo ganin hirie, bugale.  
Paouezet eo Matilin al lonker d'evan, aboc sul ar lard. —  
Ya, ar zul-ze, d'an noz, e zo bet c'hoariet eur gwall dro da  
Vatilin. Ne larin ket gant piou, gant aon da vean tapet, — la-  
komp gant Per ha Pol. Setu aman ar pezh an eus laret d'in ma  
biz bihan.

\*\*\*

Dek eur a oa. An noz tenvall an evoc ledet he mantel war  
an douar morgousket ha didrous... Didrous ? n'eo ket, avat.  
Ema Matilin adarre o teurel eus e gorf chapeled Satan, pa ne  
deul ket treo-all. Rak karget mad an eus e damm zac'h. Hag  
evitan da vean leun, e fôt d'ean dibri mel gant ar gloge. Na 'n  
eus ket, emean, e bar da drei douar, da zastum gwiniz kaer,  
da lardan ouc'hen.

Per ha Pol a zo kuzet a-drenv eur ween ha ne laront grik  
ebet. Dek paz a zo etreze. Tostat e ra an ebeul a dammigo. Ne  
deul ket buhan, rak eur gomz a renk laret dirak pep ti. « Et oc'h  
'n ho toull ? Ya ? Ma ! Nozvez vad ! »

Arru eo 'velkent... Dao ! eur boloten douar 'n e benn. —  
« Oh ! ma Doue ! lac'het on ! Ma kulpa ! ma kulpa ! dre ma  
fot ! Me 'govez ouz Doue ! » — Dao ! eun all war e fri...  
« Dre ma fot ! dre ma brasan fot ! Akt a gontrision !... Itron  
Varia Ruello, pedet evidon ! »

Per ha Pol o deus trawale'h d'ober evit harz da c'hoarzin.  
Red eo da Bol boutan e viz don mat 'n e veg. Mes n'eo ket ar  
mare d'en em disklerian.

Matilin an eus divevet eun tammig hag a adkrog da vont  
gant e hent. Ha setu dek paz pelloc'h. dao ! eur boloten douar  
'n e skouarn, ken a zon. « Ma kulpa ! ma kulpa ! ma Doue,  
ma zikouret ! » — Dao ! eun all 'n e zaoulagad... Eman Ma-  
tilin war e grabanou. « Ma kulpa !... dre ma fot ! dre ma fot !  
Akt a fe !... nan ! akt a gontrision ! Santez Anna vinniget,  
mont a rin d'ho kwelet mar am zikouret ! »

Eun heur divezatoc'h e oa Matilin 'n e wele, o krenan gant  
ar spont. Kaer an evoc Mari goulen digantan petra a oa  
c'hoarveet, respont ebet nemet houman : « Koustle ne vo ket  
gwelet ken ma daou droad en hostaliri Damdekeur, — eno e  
vije bemde — nag en hostalirion-all ! Bet eo an diaoul warnon ! »

\*\*\*

Gwir eo ; Matilin n'ev ket ken. Damdekeur a zo nec'het ;  
Mari, an hini goz, a zo joas hag he deus laket diou oferen en  
chapel an Itron-Varia. Den, ken e vo arru ar varn, ne oaro  
piou an eus grêt an tol, nemet Per ha Pol ha ma biz bihan.

MABNONI.

## HUNVRE AR MEVIER

Goude eur c'hofad gwin'ardant  
Et d'hen paeon e holl arc'hant,  
Eur mevier,  
Eul lonker

A dibunas eur beurevez,  
E benn pounner hag e gorf faez.  
Eun hunvre 'n evoc gret,  
Hag a-vec'h dihunet,  
D'e wreg e lavar  
E dammik istoar :

» Hunvreet 'meus, emean,  
» Eun dra eus ar fentusan.  
» 'Pad ma hunvre 'meus gwelet  
» Pevar raz war an oaled

» Hag i divent...  
» Redek a rent.

» An hini kentan bloc'h ha bras,  
» Daou-all, goude, treut 'vel eur vaz.  
» An hini diwean 'oa dall.  
» Biskoaz 'm oa gwelet kement-all !  
» Lavar d'in 'ta, mar plij, Janed,  
» Petra lar hevelep rac'hed ?

— Deus emez kentoc'h, ha kê d'az labour !  
» Ma karjes eveldomp tremen gant dour,  
» N'eo ket hunvreo 'velse  
» Dre da benn a dremenje ! »

Eur pôtrig bihan seiz via.

A zebre sec'h e vara,

A laras : « Ma karet, ma zad,

» Me rey d'ec'h, dustu, ho mennad ! »

— Te, marmouz,

Koz pikouz ?

» Lar d'in 'ta petra oa ar rac'hed-ze ?

— Ar raz kentan gwelet en ho hunvre

» Eo an hostiz

» Lart ha diskwiz.

» An daou-all 'deu goude, treut ha kasti.

» Eo ma mam ha me, man d'imp da zibri ! »

— Hag an hini diwean a oa dall.

Piou eo eta, lar d'in, tam marmouz fall ?

— Hennez eo c'houi, ma zad,

» Pa vec'h oc'h ober ho kofad ! »

Y. M. G.



DISKAN

Tri bugel en amzor gwechall  
A gare mont da gantreal.

Aet e oant pell-pell diouz o zi,  
Joaus, iskuit ha dizoursi,  
Ken mennoz en o fennou skan  
Met kutuilh bep sort bleuniou han.

Epad m'emaint oc'h ebatat,  
Deut eo an noz, eun noz tenval.  
Hag o deus aoun ken a grenont.  
Dre ma ne c'houzont pelec'h mont.

Int a sko war dor eur boser, (1)  
Hag a c'houl gantan digemer :  
— « Otrou mad, mar ho peus frankiz,  
« Mar plij, reit d'imp-ni lojiriz.  
— « Deut tre, deut tre, bugaligon.  
Na chomit ket war an henchou :  
Eur goan vad ganin a zebriet  
Ha gweleou po da gousket. »

Aet int en ti. Kerkent, siouaz !  
Ar boser gant e gountel vraz  
A laz, a zivad hep damant  
An tri paourkezig innosant.

(1) pe en e higer.

Ton anacet

Ha goude ma 'n eus o lazet,  
Hen 'n eus ive o c'hartailliet  
Hag o laket en eur charlen  
E-uesk an hily da c'horren.

Seiz vla warlerc'h, Sant Nikolaz  
En dachen-ze a zigouezaz,  
Hag a c'houllas gant an den kri  
Tremen eun nozvez en e di.

« — Otrou Eskob, deut tre, m'ho ped,  
D'ho digemer oun enoret :  
Reit d'in ha d'am zud ho pennoz  
Arôk mont da gemer renoz. »

« — Trugare d'ec'h, otrou hostiz,  
Pa blij d'ec'h rei d'in lojiriz,  
Mes kent mac'h in-me da gousket,  
Ezom am be deuz eun tam boued. »

« Kig leue hon eus ha kig danvad...  
« Nan, nan, kig sort-se n'e ket mad.  
« Na gwell ve d'ec'h kig m'ho disall ?  
« Oh ! nan, rak hennez a zo fall !

« Kig-sall munnit 'n hani garden,  
Aboe seiz vla so en hollen,  
Ya, an hollen aboe seiz vla,  
Er c'horn bennak eus an ti-ma ! »

Ar c'homzou ze pa 'n eus klevet,  
Ar boser zo ken fourbiet  
Mac'h eo war-vez da vagani  
Gant ar spont hag ar velkoni.

— « Na spontit ket, paourkez pec'her,  
Lar d'ezan ar Zant gant douster,  
Mes bezet glac'har d'ho torfed  
Ha gant Doue 'vet pardonet. »

Mont e ra eun d'ar charlen gig  
Lee'h ma oa an tri bugelig ;  
Astenn e ra e vrec'h dreist-e  
Hag o digas leun a yue.

— « Kousket e oamp, laront o zri,  
Hag e hunvreemp gant dudi  
Oamp en eul liorz kaer ha kloz  
Gant Eled eus ar baradoz.

MELIAP.

Donézonou da « Vreuzier ar Brezoneg »

Eur mignon. . . . .	20 real
Eur mignon-all . . . . .	1 skord
An O. Coroller . . . . .	10 lur
An O. Lefebvre, persou Plien. . . . .	10 lur
Eur mignon. . . . .	20 real

AR GRIB

O vont gant ar wenojen,  
Daou douz ha doa ken eur vleven,  
Koulz laret, war o fenn,  
A welas 'tonez ar yeot o lufran, eun dra koant,  
Arc'hant, perlez pe olifant.  
Kann a zavas, jach-bleo ha bac'hadou,  
Da c'hout piou a vije perc'hen eus ar madou.  
Ar c'hrenvan.  
Goude tapout e lip  
Ha koll e vleven divezan.  
Pa zerras an tensor, petra welas ? Eur grib ! !





# ZOAT-ARVOR

— Hon mignon, an ôtrou'n abad Perrot, rener *Feiz ha Breiz*, kure en Sant-Nouga, a zo o paouez bean galvet gant ôtrou eskob Kemper da gure en eur barouz kanton, Sant-Thegonnek.

An dibab grêt anean evit ar garg-man a ziskoue pegen mad arru eo gant ôtrou eskob Kemper labour an ôtrou Perrot etouez e genvroiz evel beleg hag evel skrivagner breizad.

Penn-rener *Feiz ha Breiz*, eur gelaouen vrezonek hag e vo moullit diouti 15,000 ar miz, sekretour ar *Bleun Brug*, kevredigez vreizad ha katolik savet dre e skoazel hag e arc'hant, krouer teâtr ha goueliou Kerian, an ôtrou Perrot a zo unan eus ar veleien vretou o deus grêt ar muian, en amzer-man, evit ar Relijion hag ar Vro. Dere'hel a rei mui-ouz-mui gant e labour, an enor grêt d'ean o paran ive war ar brezoneg hag o rei lusk ha tòn d'e oberou.

Kinnig a reomp d'an ôtrou Perrot hon gwellan ha kalonekan gourc'hemennou ; ra vo ar gammed-man 'vel an diougan eus kalz kammejon-all grêt bepred evit brasan mad ar Relijion hag ar Vro !

— Kelc'h Sant-Erwan Sant-Denez a zo o vont da lidan evit ar wech kentan gouel e batron, Sant Erwan. An 3 a viz mae, da seiz heur, oferen 'vit izili ar C'helc'h ; da diou heur, gousperou, prezegen war vue Sant Erwan gant an O. Rivalin, person Ivry ; goude ar gousperou, prosesion, e vo douget ennan skeudennou Sant Erwan ha Santez Anna. Da beder heur hanter, gouel ar C'helc'h ; peziou-c'hoari, *Kolas medisin*, *Sac'h ar marichal*, ha kanaouennou.

Alo, tud ar gêr, strapomp hon daouarn eun tam da Vretoned Sant-Denez, n'e ket gwir ? ha bezomp gante a galon an 3 a viz mae !

— N'e ket hepken en Gwengamp e vo roet prijou evit ar brezoneg ar bla-man. Bean vo ive goueliou ha prijou en Lanuon roet gant *Unanitez Arvor*, goueliou ha prijou-all, gant *Kevredigez Breiz*, prijou adarre gant ar *Gorsedd*, prijou gant an *Akademi* vrezonek ha gant *Brediañ ar Brehoneg* Gwened. Red eo e tihufe eun dro bennak spered ar Vro en hon zouez !.....

— Bro ar Provans hag he barzed a zo en kanvou bras : Mistral a zo maro. An den-man brudet dre ar bed-oll, eur barz seurt n'eus ket bet marteze aboue Homer, a oa ennan 'vel iae ha spered e vro, ar Provans. Enni an eus bet bevet dalc'had hag enni eo marvet da 84 via.

Mes ar spered a oa ennan a zo chomet beo war e lerc'h 'barz en e oberou, barzonegou souezus evel *Mireio*, geriadur ar provanseg hag eun ti lec'h an eus bet dastumet kement a gaer, gwiskamanchou hag all, bet savet gant e genvroiz e kerz an amzeriou dremenet.

Ken brudet e oa Frédéric Mistral ma kinnigas ar franmasoned d'ean lakat eur gurunen aour war e benn en eur gonsel bras grêt en e enor en kêr Rom. Mistral a lavaras nan, rak kristen e oa. An Tad Santel ar Pab a gasas d'ean neuze eur vedalen aour hag eul lizer eus e zorn.

Ra bado skouer Mistral da viken ha ma savo diwarnan kalz a vueou henvel, en kement ha ma c'hallfont bean, ouz e hini !

— Eus Sant-Malo, e skriv d'imp hon mignon *Yan Porz-Pin* penôs zo bet gant ar zoudarded eur retred vrezonek prezeget gant an O. Havard, an eus desket ar brezoneg a-benn-kaer. Pevar ugent pask a oa bet daoust d'an diaoul da c'hoari e hôtr, hag er c'hazern e oar pep seurt ardou. Koulskoude, meur a Vreton n'o doa ket kredet 'n'ean diskoue ! .. Otro person kêr a deuas da brezek d'abarde. An O. Havard a roas d'ar zoudarded skeudennou gant testeni Pask en brezoneg.

Hon gourc'hemennou start da zoudarded breton. Sant-Malo, a gemer evit reolen : Doue ha Breiz da virkiken !

## Gourc'hemennou

— Skrivan rêr d'imp diwarben *S. Nicholas hag an tri rugel*, pezc'hoari neve *Mabnoni* : « Bean zo er pezz peadra da lakat daerou da ruilha ! Pa vo gwelet pegen kri ha digalon e oa ar baganed, an dud a gompreno skleroc'h talvoudegez ar fe gristen.

Oh ! daoust piou an evo au hardiegez da laret eo paour hon yez, pa'hell displegan mennoziou ken kaer ha ken uhel ?

Eul lenner eus P...

Eur skeuden eus ar bravân da gignig d'ar eugale :

**SKEUDEN HA BUE NELLIE VIHAN.** « VIOLETTESIG AR ZAKRAMANT SANTEL. » Al labour-man a zo grêt en brezoneg ya'c'h ha sklêr gant an O. 'n abad Cudennec, kure Yvias.

Skrivan da : Maison du Bon-Pasteur, 223, Boulevard Pereire, Paris. 12 gwenneg an dousen skeudennou ; 17 real (4.25) ar c'hant.

### DIVUNADENNOU MIZ MEURS

- I. Petra dap an hini dap ar big ?  
Respont : Muioc'h a blu vit a gig.
- II. Penós lemel 4 eus 19 ha kât 20 ?  
Respont : XIX ; lemel ar varren kreiz, e chom XX.
- III. Pere ar mein zo ar muian er stank ?  
Respont : Mein gleb.
- IV. Ar c'had a goust 20 real ; ar c'honfil 4 real ar glujar, 1 gwenneg. Penós ober 'vit kât 100 loen gant 100 lur ?
 

19 gad. . . . .	95 lur
4 c'honfil. . . . .	4 lur
80 klujar. . . . .	4 lur
<hr/>	<hr/>
100 loen. . . . .	100 lur

O DEUS KAVET PEDER RESPONT :

*Pôtréd* : Marcel Magourou ; Marcel Rohou eus Plijidi.  
*Merc'hed* : Léontine Lorgouilloux, eus Plijidi.

TER RESPONT :

*Pôtréd* : François Henry ; Jacque Henry, eus Mael-Keraez ; Joseph Gestin ; Georges Cadoudal, Plijidi.  
*Merc'hed* : Jenny Boedec, Euphrasie Rivoëllan ; Jeanne Lozac'h ; Germaine Gouriou, eus Plouagor ; Eugénie Diridollou, eus Koadout ; Marie Lefèvre ; Eugénie Diridollou ; Augustine Hydrio ; Augustine Bourges, eus Plijidi.

DIOD RESPONT :

*Pôtréd* : Joseph Jullien ; Pierre Le Boule'h ; Yves Raoult ; Louis Bourhis, eus Mael-Keraez ; Briac Gautier, eus Plijidi ; Joseph Le Gall, eus Trébriant.  
*Merc'hed* : Marie Le Lay ; Nathalie Corbel ; Ernestine Guilou ; Elisa Godec ; Véronique Larmet ; Maria Bars ; Agnès Bourges ; Léocadie Chenu ; Marie Piver, eus Plijidi.

EUR RESPONT :

*Pôtréd* : Guillaume Jolu ; Y.-L. Goavec ; Théophile Le Pape, eus Mael-Keraez.  
Ar priz, eul levr Marvaillon neve gant Klaoda Prat, a zo bet tennet etre an tri gentan hag a zo het goneet gant :

Marcel Rohou.

Peb a levr Peziou-c'hoari *Mabnoni* a vo kaset da Marcel Magourou ha Léontine Lorgouilloux.

Sant-Brieg. — Ti Moulerez Sant Gwilherm, 27, Bali Charner.

An Eessaer : F. EVEN.

### Goueliou Gwengamp

I. PRIJOU BREURIEZ AR BREZONEG  
KINNIGET D'AR VUGALE HEPKEN, AR RE A ZO O HANO EN  
*Breuriez ar Brezoneg.*

Ar priz kentan 'vit ar hotred a vo :  
**Eur Marc'h-Houarn**, priz 160 lur.  
Ar c'hentan priz 'vit ar merc'hed :  
**Eur Mekanik Gwriat**, priz 165 lur.  
Ahendall :  
**Monchou** a bep seurt ment.

**Levriou** dibabet etouez ar re wellan hag ar re gaeran skrivet en hon yez ;

Da laret eo, talvoudegez **500 lur a brijou**.  
*Vel hon deus laret, vit gallout kât lod er prijou-ze, vo red dija gouzout lenn mad ar brezoneg.*

II. PRIJOU AR BLEUN-BRUG

Ar *Bleun-Brug* a ginnig bep bla talvoudegez :

**Daou vil lur brijou**,

'vit kanerien ha kanerezed, bras ha bihan. Dal ma vo peure-hrêt telen prijou ar *Bleun-Brug*, e vo kavet amañ hag en holl gazetennou.


*Pedi reomp stard hon holl vignoned, da gas gant 5 real, (priz Arvorig), hanoioù bugale a zicardro Gwengamp dreist-oll, abalamour d'e kât peurz en goueliou hag en prijou Gwengamp.*

### Donezonou 'vit goueliou GWENGAMP

(*Prijou bugale Breuriez ar Brezoneg*)

Eur Mignon. . . . .	100 lur
Eur Breizad. . . . .	50 lur
Eur Vreizadez. . . . .	60 lur

III. — Louis Morvan, ha François Tanou, eus Mael-Keraez, e oa bet arret o labouriou re divezat vit ar c'hrogad divezan, o deus kavet pep hini ter respont war beder.



## PARDON SAINT ERWAN

En kêrig Lan Ireger, rusken leun a c'houez vad,  
 Gant ar mor hag an hany o vleunian he zrovad,  
 Me gar bean bep bla, d'an 19 a viz mae.  
 En iliz an Otro Sant Erwan, tost d'e Ve.

Plijout ra d'in gwelet, 'vel eur mor o koenvi,  
 Eur bobl o 'n em dougen trezek ar Vinili ;  
 Vel goeliou 'us d'an dour, bannielou soun en-er,  
 O lispak d'an avel o aournamanchou kaer ;

Klevet ar c'hantikou bet kanet a-viskoaz,  
 Mouez ne skuiz o laret : « Sant Erwan zo sant bras » ;  
 Ar beorien o pedi, sur da gât aluzon ;  
 Kalon Erwan a drid oute en pep kalon.

Mes ar pez a garan gwelet dreist da bep tra,  
 Eo ar Penn a doug eiz beleg war o dioukkoa ;  
 Hennez eo peno Erwan, penn ar beleg a Vreiz,  
 Kalet evel ar roc'h ha skedus 'vel ar feiz.

Hennez eo penn Erwan ha penn ar bobl vretien,  
 Pobl ha ne oe biskoaz traitour d'ar fe wirion,  
 Ne oe en he c'hreden biskoaz kavet abeg,  
 Pobl sent koz an Arvor, pobl santel, pobl beleg.

E...

## DOUAR BREIZ

*Eus holl broioù ar bed, Breiz-Izel da genta !*

eme Fanch an Uhel, displeget gantan eno mennoz peb  
 Breizad en kenver e vro.

N'eo ket dre he ment, — a-vec'h ma tap 7.000.000 devez arat,  
 — eo brudet Breiz ; abalamour d'he c'haërder ne laran ket.

Mencion sers ha moal, tosennou torrek, goloet a vrug hag a  
 lan, koajou en krap gante,

.... Saoniou dispar, aw jou roc'hellek,  
 Hag e giz d'aved mut badet enne gerrek ;  
 Awejou lodennet en prajou pinvidik  
 'Lec'h ma sav er sioulder kanaouen peb gwazik,  
 'Lec'h ma c'hourve, lart-puilh ha peurlenn a yeot mad,  
 An oc'h en birgerniek, hunvrens o lagad ; (1)

Lanneier didrouz ha divag ; plenennou frank marellet a dre-  
 vajou burzudus ; moriou divent o kroزال hag o kanan beb eil  
 tro

... an holl goantiri  
 'N eus tolet ar C'hrouer warni en eur c'hoarl.

ha gret d'ei eun drem kunn, gwej moug ha tenval, gwej skeltr  
 ha laouen, a grog en kalon kement he gwel.

### I. OCHOU

Kaeran pez en eus Breiz eo ar mor ; hen en eus stummet  
 anei, koulz laret ; d'ean e tle he zemz-amzer, ha finvidigez,  
 tres spered he zud, o doare-bevan ha, zoken, he buhe epad ar  
 c'hantvejou.

Hanval awalc'h ouz staon eul lestr dare da zigeri an dour,  
 Breiz a zo eur gourenez, eul ledenez, stag er sav-heol ouz Bro-  
 C'hall hag a zispak en hanter-noz, er c'huz-heol hag er  
 c'hreiste, a-hed *Mor-Breiz* pe ar *Vanch* hag ar *Mor-Bras-  
 Atlantek*, 200 lew od.

Od kizellet ha turniet, mar zo.

(1) Ar Garrec.



Adalek *Pleg-mor Mene-Sant-Mikêl-ar-Mor* betek *bae ar Bourg-Neve* (Bourgneuf), nag a fri, nag a c'hourenez !  
Ac'hane, en eur c'hoari an dro, e kaver :


TU AR VANCH :

- Morlen Sant-Malo*, gronnet a enezi;
- Bae Lansieu* ha *dir an Argenon*; entreze eman *ledenez Sant-Yagu*, mistr ha hir;
- Bae ar Fresne*;
- Beg Frehel*, gwintet uhel us d'ar mor;
- Fri Erky*;
- Pleg-mor Sant-Brieg*, digor frank da gât an hanter-noz;
- Bae Penpoul*;
- Aber an Trenev*;
- An *Eric* pe *Eric an Talbers*, kraou bili astennet, evel eur biz, eun tri-c'hart lew bennak er mor;
- Gwañen-Vor Landreger*;
- Beg ar C'hastel*;
- Bae Perroz*;
- Pleg-mor Lanuon hag e Lew-Drez*;
- Morlen Montroulez*;
- Bae Gouic'hen*;
- Dir Gwoiseni*;
- An *Aber-Wrac'h* hag an *Aber-Vinniget*;

TU AR MOR-BRAS-ATLANTEK :

- Beg Lok-Maze Penn-ar-Bed*, a doug c'hoaz dismantrou kaer an abati savet eno gwejjall gant sant Tangy;
- Morlen Brest*, gwaskedet mad, dre ma n'eus nemet eur mulgul pe goug-mor o tigeri warni, ha frank awalc'h da digemer holl listri brezel ar bed;
- Ledenez Kraon*, pe *Krozon*, gret eur groaz diouti gant ar mor o tarc'ha; en penn brec'hioù ar groaz eman : en hanter-noz, 150 troatad a-zers 'us d'an dour, *beg ar Spagnoled* ha *beg ar C'havr*, er c'heiste;
- Pleg-Mor Douarnenez*, eun dudi e welet;
- Beg ar Raz*, hanvet ive *Kap Sizun*, goue ha garw evel *Ifern Plogo*, ha *Bae an Anaon* a zo en daou du d'ean; evit gwir, eno en em gav

.....en od fall,  
Ar gazek c'hlaz o c'hourinal.



Savet he moue hed ar stered.  
 An eon gwenn-kan distolet ;  
 Kement a zoroc'h hag er c'hoad,  
 Pa stourm ar bleizi 'kreiz ar gwad . . (1)

*Pleg-mor Gouyen.*

*Fri Penn-Marc'h*, sklerijennet an noz gant kaeran ha gal-  
 loudusau tour-tan a zo en Frans : hini Eekmühl ;

*Bae Benodet* hag hini *ar Forest* pe *Konk-Kerne*, o oehou  
 goloet a goat, o c'hoerzin d'an daoulagad ;

*Morlen an Oriant* ;

*Lagen an Intel* ;

*Ledenez Kiberen*, izel ha divag ;

*Bae Kiberen* ;

*Ar Morbihan*, hanval ouz eul len, eleiz a enezi ennan.

*Gourenez Ruis* ;

*Aber ar Vilen* ;

*Beg ar C'hastelli*.

*Beg ha ledenez ar Groazig*.

*Aber al Loar*.

*Fri Gellas*.

## II. ENEZI

A-hed ôd Breiz, eur strollad enezennou a zo strewiet evel m'o  
 dije diwal anei d'ober.

Enezennoigou, kentoc'h, eur c'halz ane.

Re ar Vanch en-devn, a zo, peurvuian, munut ha didud ; ter  
 hebken, Briad, an Enez-Veur hag Enez-Vaz a zo poblet da vat.

*Mene-Sant-Wikel-ar-Mor*, eman gwintet warnean burzudu-  
 san abati a c'houfer da welet, a zo bet gwejal en Breiz ; eun  
 hent a gas di breman ha ne ve koublet nemet gant ar mora-  
 dou bras.

Dirak Sant-Malo, - enezen ive amzer zo bet, — n' eus nemet  
 kerreg, an hano da laret : *Sezembr*, ar *C'honche* ha n'ouzon  
 ped-all ; relegou Châteaubriand, eur Breizad en eus gret kalz  
 enor da Vreiz ha da Frans dre e skridoù hag e spered uhel, a  
 zo douaret er *Be Bras* (Grand-Bé), unan dioute.

Enezen an *Ebihen*, ez-evn da Sant-Yagu, a zo enni eun  
 tour savet wardro 200 vla zo da zifen ar vro ouz ar Sôzon.

(1) Quellien.

Enaber an Trenw, eman *Briad* ha, tost d'ei, evel eur c'hora-  
 den evned endro d'eur yar goz, eur bagad enezi munut :  
*Lavred*, savet warni gant Sant Budok kentan leandi a zo bet  
 en Breiz, *Mode*, *Binniget*, an *Enez-C'hlas*, *Hern*, warnean eun  
 tour-tan, *Sant-Rion* hag all.

*Terc'h* ha *Loaven* a zo en penn gwazien-vor Landreger.

*Gellas*, *Gurage*, ha ne oaran ped-all, a wasked ar Porz-  
 Gwenn.

Etal Perroz, eman *Tavek*, hanval ouz eur pikol loen gourveet  
 en dou.

Hirroc'h en douvor, torkad ar *Jentilez* hag an *Treoger*.

An *Enez-Veur* ha *Milio* a zo tost-tre d'an douar-bras.

Tost ive enez *Kalot*, hir ha moan.

*Baz*, ledet ez-evn da Resko, a zo pelloc'h ; koulskoude, pa  
 dre ar mor da vat, e c'heller mont di war droad.

Enezennou ar Mor-Bras a ve koublet tro-pad ar bla ha n'er  
 ket en o bete pa gerer, rak ar mor a zo hed an amzer o krozal,  
 o yudal, o torbilat endro d'e. Re-vorennou, kas gante, a zo  
 entre an ôd hag int : ar Forn, ar Fromveur, ar Raz.

*Eusa* eo ar bechad pellau eus Breiz warzu ar c'huz-heol ;  
 savet uhel war an dour, kement a ve gwentet gant ar gas-amzer  
 ken ne sav enni gween ebet.

Nesoc'h da gât an douar eman *Molenez*, *Binniget* hag all.

Enezig *Tristan*, etal Douarnenez, oe repu

Fontanella a barouz Prad,

Kaëran mab a wiskas dilhad,

goues d'ar werz, mes ive gwasan mac'homer ha draster tud a  
 dôlas troad war douar.

Enez *Sizun* pe *Sun*, noaz-pilh, ne dap ket daou vetr 'us d'ar  
 mor, ha digoueout e ra d'ei bean beuet awejou. An 900 den a  
 vev enni ne ve ket stad enne pa digor ar mor ha pa yud ar  
 gorventen da-vat-ha-kaer.

Enezi *Glenan* a zo losket d'ober douar konifed.

Magerez pesketerien a helfed hanvout *Groe*. Neblec'h ne ve  
 kavet martoloded muloc'h dispart hag a vuioe'h intrudu ; gant  
 o bagou e tornont ar Mor-Bras adalek Breiz-Veur betek ar  
 Marok o pourchas an ton, ar brizili, ar garlized, ar gevr-mor,  
 al ligistri hag all.

*Enez ar Gêr-Veur*, stum eur votez-ler d'ei, eo ar vrasan hag  
 ar hinvidikan a Vreiz.

An *Houad* hag an *Houadig* a zo dister ba paour en he c'hichen.

Eus an neziad enezennoigou koant ha seder kuzet er Morbihan, an diou ar muian mentet ha poblet eo an *Izenah* hag *Arh*.

En Enez *Dumet* n' eus mui soudarded evel gwejall.

Ar bechadou douar savet us d'ar Brier-Vras n'emaint ket da vean hanvet na, kennebeut, an trezennoù izel hadet en aber al Loar.

Amzer zo bet, an holl enezennoù-ze a oe stag ouz douar Breiz; d'ar c'houlz-ze, ne oa ket c'hoaz a Vorbihan; ôchou hon bro a dape, marvat, betek ar Glenan, Sizun hag Eusa, hag elec'h eman breman bae Goulc'hen ha lod eus plegiou-mor Lanuon, Sant-Malo ha Sant-Mikêl-ar-Mor, ne weled nemet koajou.

Aboue, an douar en eus koac'het, en em destumet ha gret gwele d'an dour; ar mor o torbilat, o krignat, a beure'hreas al labour ha delc'hen e ra bepred da c'honid.

Digouet a zo, koulskoude, d'ar mor koll tachennou ive eus e du; tec'het eo eus ar Brier-Vras (Grande-Brière), hirie eul lagen hanter-dizec'het, ha ne goubl ken, evel gwejall, ar c'hor-niad douar a ya eus Sant-Nazer d'ar Groazig.

### III. MENEIOU

Meneiou Breiz n'int ket uhel kaer; meneiou int koulskoude, ha nan tosennoù, torgennou; meneiou koz en-deb, mar zo. D'an amzer ne oa kelou ebet eus Bro-C'hall, kuzet c'hoaz en donder ar mor, e savent o c'hribennoù, o fikernioù war an dour. Uhelloc'h e oant d'ar c'houlz-ze evit breman; ar glao hag an avel ouz o filat, ar skorn o frailhan ar vein o deus dispen-net hag izelleet ane.

Kredi e rer ive e loske darn dioute tan ha moged, evel ma ra breman ar Vesuv.

Diou steud a zo eus ar meneiou-ze.

Steud an hanter-noz a dap eus ar penn da Vreiz d'egile, adaleg an Normandi betek morlen Brest. *Kein Breiz* eo hanvet ha hano gwelloc'h ne oufed bean kavet d'ei rak mammen-nou al loden vras eus ar steroù hag ar gwazioù a red d'ar Vanch ha d'ar Mor-Bras a didarz ouz he zeul.

En tu-hont, peb hanter ar steud en eus eun hano d'ean: eus

Bro-C'hall da Vêl-Pistien eman *Ar Mene* hag ac'hane d'ar mor ar *Menez Are*.

En Mêl-Pistien en em gav eur c'hroaz-meneiou: *Kein-Breiz* a hasten diou vrec'h; unanig vihan ne dap ket pelloc'h evit ar Mene-Bre, da gât Treger hag an hanter-noz; unan-all, kalz hirroc'h, treseg Kerne hag ar c'hreiste, ar *Meneiou-Du* he hano.

Steud ar c'hreiste n'eo ket keit hag hini an hanter-noz ha n'eman ket en eur stagaden evelti. Tri zam a zo diouti:

*Eru Breiz*, bom kailhastr savet entre Naoned ha Pont-ar-C'hastel (Pont-Château).

*Lanneier Lanvos*, ledet eus Redon da Gamorh.

Ar *Meneiou-Du*, a zeblant eur vrec'h distaget eus *Kein-Breiz*. Ar re-man a deu da gât ar c'hreiste beteg Gronvel; ac'hane e redont treseg ar c'huz-heol ken e vent digouet en Brieg; eno e kemeront stum eur fichel: ar biz braz a dro war-za Kraon hag ar biz bihan a ziskan tost da Zouarnenez.

Eus Gronvel da gichen ar Gemene e zo ive eur steudig torgennou uhel.

Mar ne gever ket en Breiz pikoloù meneiou, e zo koulskoude hiniennou o tremen 300 metr, evel:

A) En *Kein-Breiz*: *Bel-Air*, etal Monkontour, uhellan kriben a Vreiz-Uhel (340 m).

Ar *Mene Bre*, an tostan da gât an hanter-noz hag eun tam distag eus ar meneiou-all. Savet e benn gantan dreist da Dreger, laret e rafer eur roue o c'houarn ar vro ledet dirakan; ar pikernioù a zo en e drên a zeblant dont d'e heul evel eul lez tudjentil. N'eus nemet 302 vetr ha koulskoude e ve gwelet adaleg Goelo beteg Plistin. Diwar e griben, etal chapel sant Herve, an tôl-lagad a zo dispar: Treger a dispak hec'h uhellennoù bleuniet, he stenoù karget a drevajou piavidik, he zraouiennoù seder, he steroù sklêr, hag, er pellder, gouriz glaz he mor.

Pikernioù Boulvriag: *Keroffredon* (343 m), *Kerdauidou* (342 m), *Leindevet* (303 m) hag all.

*Mene Kerspers* (321 m), en Plougonver.

*Lein koad Befou*, en Logivi-Plougras (326 m).

*Roc'h ar Feunteun*, en Plouneour-Menez (304 m).

*Roc'h-Treudou*, (371 m) ha *Roc'h-Trevezet* (354 m), heman mistr hag a-zers, o-daou en parouz ar Fouille.

*Menez-Mikél*, en Braspar. Eus holl veneiou hon brô hen eo an tad-koz ; n'eus hini-all ebef o kaout e vent nag o vean garw ha goue eveltan. E droad zo zac'het hag o chugellat er Yun-Elez, hag e gern a zav a-dôl beteg 391 m. us d'ar mor. Ac'hane e zo gwel war an darn-vuian eus kribennou Menez-Are hag ar Meneiou-Du, war ar vro astennet entreze ha, pa ve kaer an amzer, war eur bechadig mor.

b) Er Meneiou-Du :

*Koz-Liorzou* (303 m.), en Mèl-Pistien.

*Krec'h-Moelou* (303 m. ive), en Kergrist.

*Ar Mine-Du* (304), en Plevin.

*Pikern Toul-al Laëron* (326 m), en Speyet.

*Lein koad al Laz* (305 m), en Sant-Goazeg.

*Ar Mene-Hom* (330 m). Diwar e gein ledan savet us da bleg-mor Douarnenez, eun dremwel digor, sort n'eus hini par d'ean en Breiz, a dispak dirak an daoulagad holl binvidigez hag holl gaerderiou an douar hag ar mor.

#### IV. STERIOU ha GWAZIOU

Berr peurvuian, holl steriou Breiz a zo enk ha nebeut a zour enne ken a zigoue d'ar mor dont a benn-hent d'ê. Rak, evel ma vije mall gantan evan o dour sklêr, ar mor a deu d'o c'hât eur pennad mat en douarou, oc'h ober d'ê aberiou ha gwaziennou-mor frank ha don.

Rannan e rer ar steriou-ze en tri rum hervez ma redont : 1) en hanter-noz da Gein Breiz, 2) entre Menez-Are hag ar Meneiou-Du, 3) hag er c'hreiste d'ar Meneiou-Du ha da Gein Breiz.

1) O vean m'eman Kein Breiz nesoc'h d'ar Vanch evit d'ar Mor-Bras, steriou ar rum kentan eo ar re verran. War veteg unan pe diou, e tiskennont holl d'ar Vanch.

Setu hanoioù ar re vrasan ané :

*Ar C'hovesnon*, ganet en Bro-C'hall, a disparti epad eur pennad Breiz eus an Normandi ;

*Ar Rans*, a dremen dre Dinan hag a goue er mor etal Sant-Malo ;

Hag an *Argenon*, a dreuz stank Jugon ha kêrig Plankoeit, a deu o-dion eus Collinée ;

*Ar Gouesan*, a दौरa Lanbal ;

*Ar Goed*, deut d'ei he hano eus al liw ru a ve awejou war he dour ; Kintin hag al Lege, porz-mor Sant-Brieg, a zell enni o skeud ;

An *Trenw*, a red war eun eus Sant-Jili-Plijo da Vriad, evel ma vije prez warnei da vont d'ar mor. Tremen e ra dre Wen-gamp, Pontrenw, elec'h eman ar mor ouz he gortoz, ha Lezar-drenw, goude bean digemeret al *Leuv* en Fri-an-daou-dour, parouz Kemper-Gwezennec ;

Ar *Yeodi*, diskennet eus Gurunhuel ha treuzet ganti kêr vihan ar Roc'h, hag ar *Gindi*, eman he mammenn ouz troad ar Mene-Bre, en em gav dirak Landreger ; ac'hane d'ar mor ar ster a zo hanvet *Gwazienn-vor Landreger* ;

Al *Leger*, didarzet eus hec'h andon en Boulvriag, a dremen dre Goad-an-Noz, Benac'h ha Lannou hag a goue « war he fen er mor don, e traou chapel Itron-Varia ar Yeodet Ploulec'h ».

An *Douron* ;

Ar *C'hefleut* hag ar *Jarlot*, ne reont, dindan an hano a *Dosen*, nemet unan adaleg Montroulez ;

Ar *Penze* ;

An *Aber-Wrac'h* ;

An *Aber-Vinniget* ;

An *Aber-Idul* ;

Ar *Penfel*, ster Brest ;

An eiz-man eun tamm berrik ;

An *Elorn*, en eus he mammenn en Kommana, hag a dizouc'h en morlen Brest goude bean dispartiet Leon eus Kerne ha tremenet dre Landerne.

2) Ar ster *Aon*, a jach daveti al loden vras eus ar gwaziu en eus o c'havel entre ar Menez-Are hag ar Meneiou-Du. Evelse an *Elez*, deut eus Menez-Mikél, an *Hier*, andoniet en Plougou-ver hag a ia a-biou Kallak ha Kereiz ; an *Doufin*, hanvet ive *Gwaz Pont-ar-Veuzen*, a diver enni. Didarzet en koad Befou, an *Aon* a chom da gonta a-hed an hent ; mont e ra war he nan-ik en eur gildroenni, en eur aeradenni, diegt d'ei, marvad, o kwitat he bro Gerne ; c'hoerzin e ra, en eur dremen, da Landelo, da Gastel-neve-ar-Faou. d'ar C'hastellin ha da Veilh-ar-Wern hag etal Landevennek ec'h echu he redaden a 130 kilometr.

3) Kement ster a zo en drivet rum a red d'ar Mor-Bras ; an darn vrasan ané o deus hed vad.

Ar *Goayen*, a dremen dre Bonte-Kroaz hag a dinaou er mor dirak kêr Goayen.

An *Odet*, kresket en Kemper gant ar *Stein*,

An *Aven*, a dreuz stank Rosporden ha kêr Pontaven.

N'int ket hir, koulskoude.

An *Izol*, pe Iol hag an *Elle* en em gav an eil gant eben en Kemperle ; « neuze e kollont o hano. Adaleg Kemperle beteg ar Pouldu e rer al *Leta ané* ».

Ar « *Flavez* a zo, koulz laret, ster Kerne ha Gwened. War douar Briak, damdostik da chapel Sant Houarne, pe sant Herve, e fibrad eus he andon ». Ter gêr : Goareg, Pondi pe Pontivy, hag Henbont a dremen kent mont da skei he dour en morlen an Oriant. War dro 150 kilometr hed he deus.

Ar *Skorr*, deut eus Leskouet, a dreuz ar Gemene ha Pont-Skorv, hag a dizouc'h ive dirak an Oriant.

Al *Loc'h* a gav ar mor en Alre.

Ar *Vilen* eo warlerc'h al Loar ar ster vrasan a zo en Breiz, (ouspen 50 lew hed). Ganet en parouz Juvigné, en bro ar « Maine », mont e ra e-biou Vitre, Roazon, Redon hag ar Roc'h-Bernard, da zigas he dour d'ar Mor-Bras entre Penestin ha Penlan. A-hed an hent, meur a waz a diver enni : an *Il*, ar *Meu*, ar *Semnon*, ar *Cher*, a dremen dre Castelbriand, hag an *Oud*. Ar waz diwean-man, ken hir hag ar Blavez, ne ra ket kalz tro evit mont eus ar Goz-Kotle, he c'havel, beteg Redon, he be ; dre Rohan, Josselin ha Malastreg e tremen ; al *Lié*, an *Ninian*, an *Af*, ar *Chlé*, an *Arh* a deu d'he c'hreski.

Al *Loar*, hirran ster Bro-C'hall, a dizouc'h er Mor-Bras a-dal da Sant-Nazer ; en em gât e ra en Breiz eur pennad arôk digoueout en Ansenis hag epad 110 kilometr — wardro an dekvê loden eus he hed — eman stok ouz douar hon zadou. En Naoned, diou waz, unan a beb tu, an *Erdr* hag ar *Sevr* a gas d'ei o dour. Hanter-hent entre Naoned ha Penbo (Paimboeuf), eur waz-all a diver enni ; hanvet e houman an *Acheno* hag eus len Grandlieu, brasan hini zo en Frans a-bez, e teu.

K. E. V.

Ar *giriou-man*, nemet daou pe dri d'an hirran, a zo *giriou komzet* ha *klec'et ganin*, war an *ôd*, e korn pe gorn a *Vreiz*.

*Aber*, hano roet da veg ar ster pa ve digor frank ; en galleg *estuaire*.

*A-zers*, à pic, *perpendiculairement*.

*Bae*, baie.

*Bechad*, pe *tam*, *morceau*.

*Bir*, anse, *crique* en forme de *pointe*.

*Kailh*, pe *kailhastr*, *quartz*, *silice*.

*Kas-amzer*, *tempête*, *ouragan*.

*Kern*, *sommet*, *crête*.

*Korventen*, *tempête*, *orage*, *ouragan*.

*Koublan*, *entourer d'eau*, *devenir île*.

*Kriben*, *crête*.

*Digeri* pa digor ar mor : *quand la mer a de fortes marées, quand elle monte et descend beaucoup*.

*Dinaoui*, *disken* ; *verser*.

*Dizouc'han*, *sortir*, *avoir issue*, *se terminer*, *finir* ; *dizouc'han* eus eun hent ; ar wenojen a dizouc'h war an hent bras ; an Elorn a dizouc'h en morlen Brest.

*Drem kun*, *physionomie douce*, *sympathique*.

*Dremwel*, *horizon*. Eun dremwel digor ; un *horizon vaste*, *étendu*.

*Druilhac*, *grande quantité*, *grand nombre*.

*Enk*, striz, en galleg *étroit*.

*Garlizen*, pl. *garlized*, pesk hanvet en galleg *sole*.

*Gavr-vor*, pl. *gevr-mor* ; *langouste*.

*Goug-douar*, striz-douar, en galleg *isthme*.

*Goug-mor*, striz-mor : *détroit*, *goulet*.

*Gourenez*, *presqu'île*.

*Gwaz*, *rivière*. Laret e ve ive : *gouer*.

*Gwazien-vo*, brec'h-vo, en galleg ; *bras de mer*, *estuaire*.

*Intrudu*, *savoir-faire*, *initiative*.

*Jugellat*, *Avoir les pieds, la base baignant, trempant dans une petite quantité d'eau*.

*Lagen*, *lagune* ; *espèce de marais*.

*Leandi*, *monastère*.

*Ledenez*, *presqu'île*.

*Len*, *lac*.

*Legestr*, *legrest*, pl. *legistri*, *ligristi*, *homard*.

*Lez*, *cour*, *suite de personnes accompagnant un souverain*.

*Mor-bras*, *Océan*.

*Morlen*, *Etang de mer* ; *partie de mer abritée des vents ; rade*.

*Mulgul*, *goulet*.

*Od*, *rive*, *rivage*, *littoral*.

*Pleg-mor*, *golfe*, *baie*.

*Pikern*, *pic*, *montagne élevée*.

*Revoren* ha *Redvoren*, *courant marin* ; *Revorenno* kas gante : *des courants marins rapides, violents*.

*Sers*, son ; en galleg, *droit*, *d'aplomb*, *bien coupé*.

*Stacon* (eul lestr) *étrave d'un vaisseau*.

*Stead*, *suite*, *rangée*, *alignée*.

*Strewian*, *répandre*, *éparpiller*.

*Torkad*, *quantité de choses*, *d'objets assemblés ou rapprochés*, *groupe*.

*Temz-amzer*, *climat*.

*Tre*, *reflux*, *jusant* ; Pa dre ar mor da vat : *quand la mer baisse beaucoup*. Le flux se dit : *Lano*.

*Tour-tan*, *phare*.

# ISTOR BREIZ

*Goulen.* — Pesort hano eo hon bro ?

*Respont.* — Breiz eo hano hon bro ha ni zo Bretoned.

G. — Daoust ha Bretoned zo het a-viskoaz en Breiz ?

R. — Nan. Da gentan, e vevas en Breiz eur bobl dizanve, a zavas ar meinhir hag an tóliou-mein a weler ken stank war hon méziou.

G. — Piou a deuas warlerc'h ar bobl-ze ?

R. — Warlerc'h ar bobl-ze e teuas ar Gelted, hon c'henda-dou, 600 vla bennak arók donedigez Hon Zalver.

G. — Pesort tud e oa ar Gelted ?

R. — Tud kalonek meurbed ha troet gant ar brezel.

G. — Ne oant ket tud goue ?

R. — Nan, pell ac'hane ; bean oant tud a spered digor ha dorniet mad evit pep micher.

G. — Ha bras e oa o rouantelez ?

R. — Ya, bras meurbed. Kement e oa hag an Alamagn a-bez, ar Frans, an Aotrich hag ar Spagn, ha c'hoaz e oa enni lod eus Bro-Saoz hag eus an Itali.

G. — Pere eo ar re vrudet an etouez prinsed ar Gelted koz ?

R. — Ambigatus hag e nizien Bellovesus ha Sigovesus, o vevas 450 vla bennak arók donedigez H. S. ; — Luern hag e vab Bituit, o ren wardro 200 vla arók donedigez H. S.

G. — Daoust hag ar Gelted a chomas pell mestr evelse ?

R. — Ya, tost da 600 vla.

G. — Piou a drec'has warne ?

R. — Ar Romaned renet gant Kezar.

G. — Petra oe kiriek d'ar Gelted da vean trec'het ?

R. — Trec'het e oent en abeg n'en em glevet ket ha ma vije bepred gwarizi ha kasoni etre ar pennou-bras ane.

G. — Pegeit e chomas ar Romaned da vestr en bro ar Gelted ?

R. — Tri-c'hant vla.

G. — Petra c'hoarvezas e keit ze ?

R. — Jezuz-Krist, Hon Zalver, a deuas war an douar hag e relijion a oe prezet en hon bro.



- G. — Piou a drec 'has war ar Romaned ?  
R. — Tud goue eus an Alamagn a drec'has war ar Romaned hag a distrujas ar broioù a-bez.  
G. — Piou a deuas war o lerc'h da adsevel hon bro ?  
R. — Eur hobl hanvet ar Vretoned.  
G. — Eus pesort bro e teuent ?  
R. — Eus Bro-Sóz a oa hanvet en amzer-ze Breiz-Veur.  
G. — Daoust ha tud goue a oa ar Vretoned ?  
R. — Nan, tud sevenet (1) e oant hag, ouспен, e oant kristenien.  
G. — Pesort beleien o devoa ?  
R. — O beleien a oa menec'h, tud santel hag a veve 'barz ar binijen vrasan.  
G. — Laret o hanoioù ?

Brieg ha Kaourantin, Samson, Tual, Malo  
'Zo, gant Pól ha Patern, penn-eskibien hon bro.

- G. — Ha goude ?  
Eman e'hoaz Gwenole, Beuzek, Iltud, Gweltas,  
Ha Briak ha Herve, sent hag abaded bras ;  
Sant Modez, Sant Ronan, Sulic ha Koneri,  
En nenv, us d'hon fennou, 'vel stered o lintri.  
G. — Dre benós e oa 'n em gavet Breiziz Breiz-Veur da zont da Vreiz-Izel ?  
R. — Chaset e oant bet, goude kant vlavez brezel, gant eur hobl goue, ar Zózon, o devoa galvet da zikour ane hag en em droas eneb d'e.  
G. — Daoust hag an holl Vreiziz a guitaas Breiz-Veur ?  
R. — Nan ; lod ane en em dennas en meneioù Bro-Gymru (pays de Galles) elec'h ma c'halljont stourm ouz ar Zózon. Eno emañt bepred.  
G. — Pehini eo ar roue breizad a drec'has bepred war ar Zózon ?  
R. — Hennez eo ar roue Arzur, a vo brudet da viken etouez ar Vretoned.  
G. — Diskleriet berr ha berr doare-bevan ar Vretoned, hon tadou ?  
R. — Ar gerent ane en em vode etreze hag an holl diegeziou unanet evelse a vije renet, a rum da rum, gant mab hanan an

(1) Sevenet, civilisé.

tiegez gwellan. Heman vije grêt dioutan *tiern*. Ar Vretoned, peurvuian, a veve war ar *méz*, o labourat douar hag o sevel loened. Koulskoude, brezellourien e oant ive, hag alies e save krogioù etre an tierned.

- G. — Petra rè ar venec'h ?  
R. — Ar venec'h a glaske bepred miret ar peuc'h 'barz ar vro ; kelen a rént ar yaouankiz en o skolioù, hag ar peurest eus o amzer a dremenent o pedi hag o labourat douar.  
G. — Petra oa eul « lann » ?  
R. — Eur barouz savet endro da vanati ar venec'h.




Ar roue kelt Ambigatus hag e nizeien.

- G. — Petra oa ar varzed ?  
R. — Ar varzed a oa kanerien hag a zave gwerzioù 'vit an noblans hag ar hobl diwarben an tollioù kaer grêt gant tud eus ar vro.

- G. — Pesort talvoudegez an evoa o labour ?  
R. — Deski rént d'ar Vretoned anaout o bro, karout hec'h enor hag he frankiz ha kerzet war rondou o zud koz.  
G. — Ped rouantelez a oe savet gant ar Vretoned en Breiz izel.  
R. — Ter rouantelez : an Domnone, en hanter-noz, Kerne ha Gwened, tu ar c'hreizte.  
G. — Roaón ha Naoned, daoust ha stag e oant ouz Breiz, en amzer-ze ?  
R. — Ne oant ket ; ar Franked a oa mestr d'e.  
G. — Piou oa ar Franked ?  
R. — Eur bobl eus an Alamagn renet gant Kloviz hag an evoa kemeret Bro-c'hall.  
G. — Daoust hag ar Franked a oa mignoned d'ar Vretoned ?  
R. — Nan ; dalc'hmad e vije brezel etreze.  
G. — Pere eo ar re vrudetan etouez ar Vretoned a reas brezel d'ar Franked ?  
R. — Guiomarc'h, Witur ha, dreist-oll, Morvan, lezhanvet Lez-Breiz, a oe lazec'h o tifenn ar Vro.  
G. — Petra c'hoarvezas goude e varo ?  
R. — Breiz a chomas eur pennad dindan galloud ar Franked, ken e teuas Nominoc.  
G. — Piou oa Nominoc ?  
R. — Eur prins breton hag en em zavas gant an abad Sant Konwoion evit argas ar Franked erméz a Vreiz-Izel.  
G. — Pesort hano an eus an emgann a c'honeas Nominoc war ar Franked ?  
R. — Emgann Ballon, kichen Redon, er bla 845.  
G. — Pesort a c'honeas Breiz warlerc'h an emgann-ze ?  
R. — Gonit a reas he frankiz, ha Roaón ha Naoned war ar marc'had. Nominoc, kurunet a-beurz ar Pab, a oe hanvet roue Breiz ha sakret gant eskibien Breiz.  
G. — Pesort lezhano a oe roet da Nominoc ?  
R. — Galvet e oe gant ar Vretoned « Tad ar Vro ».  
G. — Piou a oe roue Breiz warlerc'h Nominoc ?  
R. — E vab Erispoe.  
G. — Penós e varvas Erispoe ?  
R. — Lazet e oe gant sujidi displeal, en o fenn Salaün, e genderv, a reas 'n e c'houde.  
G. — Daoust ha n'eo ket pedet Salaün evel eur zant ?  
R. — Eo, rak en despet d'e dorfed, Salaün a oe eur roue bras

hag eur gwir zant. Ober a reas epad e vue pinijen rust evit e bec'hed.

- G. — Penós e varvas ar roue Salaün ?  
R. — Mervel a reas evel Erispoe, lazec'h gant tud fall ; kinnig a reas e varo evit kaout ar pardon eus e dorfed.  
G. — Enepe pesourt enebourien an evoa bet Salaün da stourm.



Ar Gelled dirak hez Rom

- R. — Eneb an Normaned.  
G. — Pesort pobl e oa an Normaned-ze ?  
R. — Tud goue, kri ha didrue a deus eus broiou an hanter noz hanvet breman Sued, Norvej, evit ober reuz ha peilha hon broiou-ni.



- c. — E kenver pesort tud e oant ar gwasan ?  
r. — E kenver an dud a iliz, menec'h ha beleien. Devi a reent o ilizou ha laz ane gant ar brasan krizder.  
g. — Petra c'hoarvezas goude maro Salatin ?  
r. — Ar Vretoned a gollas kalon hag a oe trec'het gant an Normaned.  
g. — Piou a sovetaas neuze Breiz ?  
r. — Eur roue galloudus, Alan, lezhanvet Meur. Trec'hi reas war an Normaned en eun emgann bras tost da Gistrebez (887) ha keit ha ma vevas, ar peuc'h a renas en Breiz.  
g. — Petra c'hoarvezas goude e varo ?  
r. — Ar Vretoned e savas dispartit etreze adarre hag an Normaned a deuas da vestr d'ar vro a-bez.  
g. — Petra reas ar Vretoned ?  
r. — Ar Vretoned a renk uhel, menec'h ha tudjentil, a gwitaas ar vro o kas gante relegou ar zent ha tensoriou an ilizou. An dud a renk izel chomet er vro oe lazet pe a deuas da vean sklaved dindan an Normaned.  
g. — Pegeit e padas an amzer reuzeudik-ze ?  
r. — 35 vla.  
g. — Ha goude ?  
r. — Doue a glevas pedennou sent ar Vro hag a gemeras true ouz e bobl.  
Eur manac'h santel meurber, hanvet Yan, harpet gant mab-bihan Alan-Veur, Alan al Louarn, a deuas a-benn da argas an Normaned ha da renti da Vreiz he frankiz.

GWELTAS.



## DANEVELLOU

### LUERN HA BITUIT

(200 vla arók D. H. S.)

Luern hag e vab Bituit a oe rouane eur meuriad (tribu) hanvet an Arverned, e oa o donarou elec'h eman hirie an « Auvergne ». An Arverned o devoa dindane ar poblou-all eus Bro-c'hall, hag o frinsed a oa galloudus bras.

Douget war eur c'harr arc'hant, an aour hag ar voulouz ru o lintri endro d'ean, Luern, pa gerze d'ar brezel, e kerze 200.000 soudard d'e heul.

En amzer a beuc'h, ne oa netra par d'e lore'h ha d'e largente. Biskoaz ne oe gwelet goueliou seurt ma ré.

Ar gouel a vije eur pred hag ar poblou, dre oll, a vije pedet d'ar pred-ze. Vit digemer anc, ne oa, 'vel just, palez ebet bras awal'h. Luern a ré neuze sevel eur c'hleun endro d'eur park a vil devez arat, hag eno e tastume berniou boed hag evaj a bep seurt, dreist-oll gwin ha chufere. Epad sunvezioù e vije debret hag evet ha kanet gant ar varzed gwerzjou en enor d'ar roue. Ar Greked hag ar Romaned a gont ze d'imp en o levriou a vane mantret o welet kement-all.

### IJIN AR GELTED

*Tól-lagad war al labour-douar*

Ar Gelted a oa tud a vrezel, mes tud a ijin e oant ive. Gouzout a rént hadan ha temzi gwiniz, kerc'h, hei ha gwel-lât o douar en eur lakat ennan ra, evel ma rér hirie. An douarou a vije troet gant eler war rojou ha bruzunet gant an hoged pe an dramailh. Adalek neuze e oa anaveet eur seurt troc'herez ed, dent houarn d'ei savet war rojou ha kaset gant kezek.

An ed a vije dastumet en leuriou goloet ha dornet tam ha tam, rak an ed gvrac'hellet 'boue pell amzer a vije bloc'hoc'h ar c'hreunen anean. Da ózan anean, e oa kreñriou grêt gant reun bezek.

Ar Gelted a ouie sevel pep seurt loened, hag ober gante impli vad 'vit al labour hag ar bevans : ar muian seurt o devoa eo denved ha moc'h ; denved, 'balamour d'ar gloan d'ober dilhad ; moc'h, 'balamour d'ar c'hig. Mes kezek kaer o don

ive ha saout hag oc'hen. Houidi a vije lardet da werzan ha da zibri ha gwenan a vije kavet dre oil abalamour d'ar chufere.

**MARO MORVAN**

(818)

Morvan, komt pe tiern a Gerne, a oa bet dibabet da roue gant ar Vretoned evit ma renje ane d'an emgann eneb d'ar Franked. Impalaer ar Franked, Loeiz, mab Charlemagn, a zavas eun arme hag a gerzas da gastizan Breiz.

An tól kentan, e kollas gant ar Vretoned; mes dizrei a reas war e giz hag ec'h eas da lakat seziz war gastel Morvan, ar Minez Morvan, a oa tostik-tost da lec'h eman hiric abati Langonet. Kant mil soudard a oa gant an impalaer. Kaset zo kelo da Vorvan e renko plegan pe mervel. Ar prins n'eman en e zonzj na plegan na mervel. En e gastel difennet gant magoriou bras ha toulleou ledan, Morvan hag eun nebeudik soudarded a oa gantan a oa barrek da stourm ken na deuje ar goanv d'ober d'ar Franked mont en o zro. Mes re der e oa evit chom keit-all chouchet evel eur c'had spontik. Pa welas arme vras ar Franked o c'hronnan ar magoriou, ar gwad a zavas d'e benn. Gervel a reas e zoudarded hag en eur vriata e vweg hag e vugale, e laras d'e: a Bezet dinec'h; me zo o vont da welet penós eman kont gant ar Franked ha ne dizroin ket en goulo.

Mont a reas, goude bean lavaret eur c'henavo divezan d'e bried muian-karet.

Hepdale, en em gavas gant eur bagad enebourien o kas en o rök eur vanden saout ha kezek. Morvan a lammas warne hag a lazas an darn-vuiian ane. Skei a reas ive gant o c'habiten, mes heman a dec'has rök an tól hag o tizrei d'e dro, e skoas Morvan en e ividig. Lazet e oe war an tól.

An impalaer gall a oe laouen bras pa welas digaset d'ean penn ar prins breton. Ar Vretoned leun a c'hlac'har a gollas kalon o vean kollet o roue hag a blegas da gement a oe goulnnet digante.

Hano Morvan a zo bet miret gant enor vras evel hano eur brezellour kalonek marvet evit difenn e vro.

Lenn, ouспен, barz *Bw ar Zent*, diwarben istor Breiz, en amzer goz, bucou:

*Sant Donasian ha Rogasian*, (pajen 381).

*Sant Gwenole* (p. 167).

*Sant Gweltas* (p. 107).

*Sant Judikast* (p. 871).

*Sant Iltud* (p. 769).

Hag ar zent koz-all, dreist-oil ar Seiz Sant.

**Gwerziou ha soniou**

*Ar zoniou, gwerziou ha barzonegou a zo aman warlerc'h a zo da reski dre 'a envor. Ar vugale a dbaboen o zouez an hini a garfont Gallet e vo goulenn digante disklerian goude, en galleg, ar pez o devo lavaret en brezoneg.*

*Gallout a ra ar vugale dibab ive etouez ar gwerziou-mañ:*

*Ebrel*, gant Meliaf (Arvorig miz ebrel 1914, pajen 54).

*De-ha-bia*, gant Laouik (Arvorig miz genver 1914, p. 14).

*Bevêt, bevêt Arvorig*, gant Laouenanig ar Roz (Arvo ig genver 1914, p. 13).

*Hunvre ar mevier*, gant Y. M. G. (Arvorig miz ebrel 1914, p. 63).

*Ma biniou*, gant Koumaig Arvor (Arvorig miz meurs 1914, p. 47).

*An diskarr-amzer*, gant Gab Liskildry (Arvorig miz meurs 1914, p. 46).

*Madalen trubuilhet*, gant Roc'hlan (Arvorig meurs 1914, p. 49).

*Kimiad*, gant A. Porzer, (Arvorig c'houevrer 1914, p. 29).

**War Roudou Brizeuk**

(*Kanvou Breiz*)

Meinhiñ didrous, teuziou al lann,  
Gant doujanz ouzoc'h e sellann.

'Uz d'imp an noz du a ziskan,  
Emêz, tro-zro, den ebet ken.

War gñ amzeriou dremenet,  
Rec'hier du bras, ma c'helenet.

Daoust ha piou ho savas gwechall,  
En tu kuz-heol doc'h a Vro-C'hall?

C'houi zo bras evel jeanted,  
Gant dorn jeant oc'h bet plantet?

Man louet zo war ho tiouskoaz,  
'Vel blev mil via ha mil via c'hoaz.

War hoc'h lanneier, hep finval,  
Gant hoc'h hunvre, ho penn tenval,

C'houi ho peus gwelet o vonet,  
A rum da rum, ar Vretoned.

An drouized, dremmou garo,  
Gant o zae lin, er c'hoat dero;

Brenned (1) lugernus 'vel stered,  
Gante kelc'hennou alacuret;

Rouane hag eur rummad hir  
A duked Breiz sternet gant dir;

Ha leaned er broustkoajou,  
A-hed ar roz, 'uz d'ar prajou;

Holl zent Leon ha re Gerne,  
Treger ha Gwened: kalz ane.

Betek Anna, an Dukez Vad,  
Adal Cesar, dalc'hmad, dalc'hmad,

Dalc'hmad welec'h ar Vretoned,  
War an enebour o vonet.

N'o doa netra 'n o faourante,  
Netra nemet o liberte;

Ha 'n eur derri-krenn o chaden,  
Holl a leuskent o youc'haden:

« Gant an estren chom da vevel?...  
Biken! Biken! Kentoc'h mervel! »

Ar c'han-ma d'ac'h zo kinniget,  
Amzer goz, amzer veniget.

Neuze oa kestel bras er vro,  
Koaou bras d'o difenn, tro-zro;

Neuze ar zaliou zistone  
Gant mouez ar varzed a gane;

Ar c'hoajou drite, heb dic'han,  
Gant al laboused o richan.

Ar c'hestel bras zo diskaret,  
Ha noaz ar mēziou, noaz-maret.

N'eus ken a varzed d'hon kelen;  
N'o deus ti, na tan, na telen.

Kalon Breiz zo ken yen ha skorn,  
Ha sec'h ha kalet 'vel askorn.

[1] *Brenn*, mestr-arme ar C'helted, war a grede Brizeuk.

Ne garer ken, en hon bro baour,  
Nemet an arc'hant hag an aour!...

Tud an amzeriou dremenet,  
Emēz ho peiou retornet!

Gret ganimp-ni tud krenv ha tēr,  
A blijo d'e bue dister.

Kentoc'h 'vit bout lusk ha diwad,  
Gwell ve d'imp chom tud goue er c'hoad,

Vel pa domme ar c'halonou,  
Gwechall, gant ho kanaouennou.

Evidon-me, me a c'houlen  
Ma leusko Doue e walen,

Ma vo gwasket hon amzer gri  
Ne oar met diskar ha terri;

Diskaret ganti dervennou  
Bet keit-all war lion tachennou;

Ganti draillhet ha bruzunet  
Testeu-mein an traou tremenet.

Alan Porzer.

(D'achui ar wech-all).

---

## O vont hag o tont

---

Dec'h e kavis 'n eur wenojen  
Youen ouz dorn o bōtr bihen:  
Gant an oad e oa deut an noz  
War daoulagad an tadig koz.

Ha me laret en eur dremen:  
« C'h er d'ober eur valeaden?  
Dindan nerz an neve-amzer,  
Vad ra monet er parkerier. »

— « Ya, dre ma farkerier, otro,  
Gant pljadur e ran eun dro.  
Da c'hōut mar ga an treo bepred  
Evel er blaio tremenet. »

Lomig a ro harp d'am c'herzed,  
Ha me sklerijen d'e spered:  
D'am fōtr bihen e plij goulen,  
Hag an tad-koz a gar kelen.

Vel 'rer allazig d'eur bugel  
A c'hoarz ouzoc'h en e gavel,  
War an trevajo o vleunian,  
Me a doug ma dorn d'o flouran.

Ha ma bannaoc'h gwad a santan  
Endro d'am c'halon o tomman,  
Mesk al lin, an ed, ar melchen  
A gas d'in c'houez vad o alon.

Pa ve ma mabig 'n em c'hichen,  
Dibreder e c'hellan pourmen,  
Hag evel e 'plij d'imp hon daou  
Mont ha dont war eun dro, « traou. »

\*\*

Eru 'nt pell, n'o gwelan ken,  
Ha me bepr d'er wenojen,  
Kanet 'n em zav, ha ma spered  
Gant ar c'houjo an eus klev. t.

« Tadig-koz, n'e ket gaou ho kont,  
Ho-taou 'h oc'h o vont hag o tont. »

Ha daoust 'c'h et kenver-ouz-kenver,  
Nan oc'h ket e memez amzer.

Unan o krapat d'ar vue,  
Eun all o tisken en e ve ;  
Unan 'rôk d'ean o sellet,  
Eun all gant an trao tremenc.

An noz tenval a renk lec'hel  
Dirak ar mintin o sevel ;  
Er bed-man bepred memez kont :  
Unan o vont, eun all o tont. »

GAR LASKULPEY.

# SON AR VOUALC'HIG

ALLEGRO

Drenv ar me - ne gous - ta - dig An heol a  
zis - ken - ne. Drenv ar me - ne gous - ta - dig An heol a  
zis - ken - ne War an u - he - lan bo - dig Ti - re  
li la, ti - re - li, la ti - re - li la la la War  
an u - he - lan bo - dig an tad moual'h a ga -  
ne An tad moual'h a ga - ne.

Drenv ar mene, goustadig } bis.  
An heol a ziskenne,  
War an uhelan bodig,  
Ti re li la, ti re li la, ti re li la la la  
War an uhelan bodig.  
An tad-moual'h a gane, (bis.)

En e vouez e seblante  
Ruilhal perlez dispar,  
A gouez, gant karante.  
War sioulder an douar...

« Kanomp, kaoomp, emezt,  
Setu deut ar bleunioù ;  
An oabl en em ziskeuda  
E glatur ar maexioù.

Da zerr-noz ha da vintin,  
An heol war ar spenn-gwenn  
A dôl, en eur vouez'hoarzin,  
Perlez e gurunen.

An neiz a gren war ar brank,  
Ar waz a dint er man...  
Kalonou an dud yaouank  
A drid hag a richan.

Kanet 'ta, yaouankizou,  
C'heui eo « hany » Breiz-Izel,  
Bleun buzek he méziou,  
Diamant he mantel !

Lezel bleunioù ho kalon  
Da zigor d'ar vue  
Evel clesir an andon  
Da bok an heol kreiste.

Ho kalon leun a 'turnez,  
Liorz a goantiri,  
Elec'h ma vout, hep paouez,  
Eun ezen a zudi...

Me garfe, gant an ezen,  
Richan enni bepred  
Ha diskenn war ar c'hlazen  
Da gutuilh eur boked.

Boked flam ha lugernus,  
Tensor ar yaouankiz,  
Rozenig karantezus,  
Lilien leun a c'hliz !

Siouaz, bue eur vleun  
A zo bresk ha dibad,  
Mes, o tilih ar rozen,  
E virer ar c'houez vad... »

Al l'apousig beg-melen  
A difonas e gan ;  
Me boanie war ma zelen  
Da dapout an diskan.

Tarnijet eo an evnig  
E moren ar zerr-noz ;  
Me ginnig d'oc'h e zonig  
Evel eur boked roz.

KOULMIG-ARVOI.



## D'AR WERC'HEZ HEPKEN...

*War dôn : Zerr-noz (an ao Gall).*

Rozennig koant, ken gortozet,  
An amzer a zo digouezet :  
Poent eo d'it dispak da gaerder  
D'an neve-hanv ha d'ar sklerder.

Endro d'it, kalz, kalz a vleuniou  
A deul o c'houez dreist ar c'hleuniou ;  
Ar gouanv a zo dre-holl trec'het,  
Te hepken a chom diterc'het...

Fin miz ebrel, da goulz, rozen,  
Bezan e teus grouez ha glizen,  
Evned ouspenn o richani,  
Hag e chomez hep dihuni ?

Kaer a zo donet da welet  
Ha kaer koll amzer da zellet,  
Ne finvez ket... Kousket ez out ?  
Diwall na deufemp d'ez kazout !

Ar rozen a zeblant mouza  
A lak an dudou da skwiza ;  
Setu hi dilezet gante,  
N'eo ket, marvad, groet evite !

Nan ; rak da skeuden ar Werc'hez  
Eo e fell d'ei miret he c'houez :  
Eno e vev, eno ive,  
E vleunio d'an de kentan vae...

Hag an de-se, dudi, burzud !  
— N'o ket d'ar bed, n'eo ket d'he zud, —  
Ar rozen a zo digoret  
Hepken evit ar Vam garet...

Pa baras, gant mouse'hoarzaden,  
An heol lirzin war ar skeuden,  
C'houez-vad ar rozen a zave  
Da laret d'ar Werc'hez : *Aoe !*

Branskellet skanv gant ezennig  
Ar rozen, doujus, a ginnig,  
A ginnig d'an Itron-Vari  
Gliz-aour he gened o lintri...

Aon kalz d'ezi bezan zaotret,  
Aon, dindan treid, bezan flastret,  
E tispign, en eur beurevez,  
Holl denzorieu meur a zevéz.

Al liorzer, pa oe zavet,  
A gavas anezi goenvet,  
Goenvet !... Mes endro d'ar Werc'hez  
E tarnije bepred he c'houez...

AR YEODET.

*3 Mae 1914, (warlerc'h ar gousperou).*

## ARCOAD ARVOR

— Hon mignon ha kenlabourer, an O. Bescond, kure Peurit, a zo bet hanvet person en Plounerin. *Arvorig*, he lennerien hag he skrivagnerien a ginnig d'ean o gwellañ gourc'hemennoù. En Peurit, an O. Bescond an evoa labourer a gorf-roched hag etouez an oberou savet eno. *Reuriez ar brezoneg* he devoa bet harp digantan bepred. Pedit reomp Doue da vinnigan adarre en Plounerin e labour kristen ha breizad.

— En Sant-Malo, herve ar c'helo a den d'imp digant hon mignon, *Yan Forz-Pin*, ar zoudarded breton o deus c'hoariet adarre peziou brezonek. Berraj omp er miz-man vit gallout disklerian ar gouel war e hed. Hon gourc'hemennoù kalonek a gasomp da vihana, d'ar c'hoarierien ha d'hon mignon.

— En Sant-Denez, eo bet grêt gouel Sant Erwan, an 3 a viz mae en *Kelc'h Sant-Erwan*. N'eo ket trawalc'h lavaret eo bet brao : eur gouel brezonek, en bro estren, evit bodan ar Vretoned, pa unaner ane war an dro dra liamm ar Yez hag ar Relijion a zo eun dra santel. Bec'h d'ar gouelion brezonek ha kristen !

— En Koadout, gonel an iliz neyeaet dre labour ha poan an O. Goasdoue, person, a zo bet grêt gant an O. Pennec, vikel-  
vras, ar zul 10 a viz mae. Eleiz a veleien hag a bobl a oa en  
iliz an de-ze. D'abarde, ur « gomun », dre anaoudegez vad, a  
ginnigas d'an O. Goasdoue eul labour eus ar c'haeran kizellet  
gant an O. Ely-Montbet eus Caurel. Eun el e oa, « El an ilizou  
mad », ouz e goste iliz Koadout. An donézon-man a ziskouez  
war an dro talvoudegez labour an O. Goasdoue ha kalon vad  
e barousianiz.



BANIEL BREURIEZ AR BREZONEG (Merc'hed)  
Grêt e Ti Roc'h-Par Lokmaria (Ploumagor)

An Evesaer : P. EVEN.

Sant-Brieg. — Ti Moulerez Sant-Gwilherm, 27, Bali Charner.

# BUGALE

laket ho hano en **BREURIEZ AR BREZONEG**,

kemeret koumanant da *Arvorig*;

deut da gemer lod

er **prijou kaer**

a vo kinniget d'ac'h

**EN GWENGAMP**

an 8, 9 ha 10 a viz gwengolo !

*Kas an hanoiou hag an arc'hant d'an O. Even,  
Landreger.*

